

Trede leor

DOMINIAU



FEIZ HA
BHAIZ

5.12.2014

TAOLENN

KENTA KEVRENN. — Soniou evid an holl.

	PAJENN
1. — Salud, Breiziz	9
2. — Gwir Vretoned	10
3. — Bro Goz va Zadou.....	12
4. — An Alarc'h tremor.....	14
5. — An hini Goz.....	16
6. — Sav, Breiz-Izel	19
7. — Gavrig an hanv.....	20
8. — Va zi bihan.....	22
9. — Alc'houez an eurusted.....	24
10. — Paotr e c'halle plat.....	26
11. — An eosterien	28
12. — Angelus an noz.....	29

EIL KEVRENN. — Soniou evit tud yaouank

13. — An Hollaïka	33
14. — An Astrailhad	35
15. — Ar werzid arc'hant.....	37
16. — Va dousig koant.....	39
17. — Helena	41
18. — Soazig	45
19. — Mona	47
20. — Loeizaïg ha Perig.....	49
21. — Pennherez Penn-ar-roz	51
22. — War bont an Naoned.....	52
23. — Kabiten Sant-Malo	54
24. — Bleuniou o tremen.....	55
25. — Skeudenn garet	57
26. — Plijadur ha displijadur.....	59
27. — Paotr ha paotrez.....	60
28. — Marivonig Keryell.....	61
29. — Karantez da genta.....	63
30. — Soubenn al laez.....	65
31. — An durzunell	67
32. — Va merc'h Janned.....	69
33. — Tina goant	71
34. — Penaos e rin-me krampoez.....	73

TREDE KEVRENN. — Soniou evit bugale.

	PAJENN
35. — Al labousig gwenn.....	77
36. — Va c'hi ha va c'haz.....	78
37. — Kotogotogok	79
38. — Beg al laouenanig.....	82
39. — Yannig an difouper neiziou.....	84
40. — Kaourintinig ha Marivonig.....	86
41. — Dans-tro	88
42. — Ar paotr glac'haret.....	89
43. — Ar mesaër bihan.....	90
44. — Ar mab	92

PEDERVET KEVRENN. — Rimadellou koant ha divizou fentus.

45. — Ar c'hi en dienn.....	95
46. — Son ar c'hafe.....	96
47. — Ar goulenn-eured	99
48. — Laou ar Brabanser.....	103
49. — Yann paotr ar gêr.....	113
50. — Kenavo !	119



Breiziz, va c'henvroiz karet,

Dal m'en em lake ar Varzed koz da gana, e veze o c'hanaouennou ken dudius ma tirede, raktal, an Aelez, d'o selaou, war dreujou ar baradoz.

Kement-se a zo bet skrivet diwar-benn Barzed ar V^{vet} kantved; kement-se a c'hellfed da lavarout, kenkousls all, diwar-benn Barzed an XX^{vet} kantved; da zevel kanaouennou a vez eun drugar o c'hlevout, Breiziz n'o deus ket o far: Evit gwelout ha ne veulan ket re en holl va c'henvroiz, digorit *Kanaouennou ar Bleun-Brug* ha levriou Soniou *Feiz ha Breiz*; war veur a dra e vezomp trec'het, met lakit komzou ha toniou ar soniou-ze kenver ha kenver gant komzou ha toniou soniou broiou all ar bed hag e rankoc'h anzav ganen ne gaver ket a zoniou kaeroc'h eget re Vreiz e nep lec'h.

O lakomp eta etre daouarn hor yaouankiz ha deskomp d'ar re-man o c'hana, evel m'eo dleet; laouenoc'h e vezo Breiz hag al laouenedigez, her gouzout a rit, eo merc'h ar baradoz evel ma 'z eo ar boan merc'h an douar.

Ma na lakomp ket a zoniou mat etre daouarn hon tud yaouank e kanint soniou lous ha flaerius a ginniger a vil-vern d'ezo e yez Bro-C'hall, rak ar yaouankizou a rank kana da greski o levezeg ha da ankounac'haat o zristidigez.

Parreziou a zo ha ne glever kanaouenn ebet enno ken ha nemet gwasoc'h a-ze ez eo o stad, rak parreziou int hag enno ar vuhez kristen hag ar vuhez vreizek o vervel.

Kanomp eta ha lakomp kana, en dro deomp, ma vezo koantoc'h ar maeziou, skañvoc'h al labouriou, sederoc'h ar c'halonou ha laouenoc'h an eneo.

Y. V. PERROT,
Rener Feiz ha Breiz,

Pennad eus ar brezegenn a reas warlene e Bleun-Brug Douarnenez, d'an 3 a viz Gwengolo 1929.

SKLAERIJENN

Komzou an *Hini Goz* a zo bet dastumet er bloaz 1876 gant Abgralled Kerloarec, eus a Lambaol-Wimiliau; kavet int bet etouez paperou koz an Aotrou Y. V. Abgrall, dean chalonied Kemper marvet er bloaz 1926.

Koublad kenta *Gavrig an hanv* a zo bet dastumet e Sant Noug, breman ez eus pemp bloaz war nugen; ar re ali a zo bet savet gant Rener *Feiz ha Breiz*.

An *eosterien* a zo bet savet gant an A. Dujardin, medecin e Lokournan.

Ar *werzid arc'hant*. Ar werzid = *le fuseau*, e galleg. E Leon n'anavezet ket kals nemed ar ger hinkin; hogen, heman n'eo, e gwirionez, nemed ar vaz houarn a zo e kreiz ar werzid.

Ar *goulenn-cured* a zo bet savet gant Yann Wilhou Herry, beleg retred Kemperle 1803-1880; an A. Perennes, beleg hospital Kemper, eo en deus degaset d'eomp ar c'homzou bet kaset d'ezan gant an A. Cabioc'h, person Sant Gwazeg. An ton a zo bet degaset d'eomp gant an A. Boulic, beleg Retred Kemper goude m'oa bet skrivet gant an A. Mayet, ograouer iliz-veur sant Kaourintin.

Laou ar brabanser a zo savet, diwar skouer « *Le Franc archer de Bagnolet* », eur farwellerez koz bet graet war-dro ar bloaz 1470. C'hoariet eo bet evid ar wech kenta e Folgoad, gant Andre Pronost, eus a Blougerne, d'ar 25 a viz m'eurz 1930.

Ton ha diou linenn genta ar ganaouenn a zigor ar pezh a zo bet roet d'in gant Y. an Drezen eus a Vrest.

Ar ger serch = *cercueil*, a gaver er pezh-ze a zo anavezet mat e Kerne hag er parrezion tro-war-dro da Lokournan ha da Witalmeze; an hini en defe aoun na vefe ket anavezet ar ger serch gant e zelaouerien a c'hellfe lakat : *krog eo en da ler*, e lec'h : *krog eo en da zerch*.

Toniou Yann *paotr ar gér*, a zo bet savet gant an A. Conq, (*Paotr Treoure*), person Lok-Gwennole.

Toniou *Soniou Feiz ha Breiz* a zo bet skrivet gant an A. Barraine, unan eus gwella sonerien ar vartoloded, e Brest.
Y. V. P.

KENTA KEVRENN

Soniou evid an holl

Salud Breiziz !

The musical score is written on four staves in a treble clef with a key signature of one flat (B-flat) and a 6/8 time signature. The melody is simple and rhythmic, with lyrics written below the notes. The lyrics are in Breton and French.

Da - lud Brei - ziz, gant ka - rantez, d'an
holl yec'hed ha le - ve - nez. Da -
- lud Brei - ziz, d'an holl yec'hed
ha le - ve - nez.

Salud, Breizis, gant karantez !
D'an holl yec'hed ha levenez !

DISKAN :

Salud, Breiziz !
D'an holl yec'hed ha levenez !

Dirazoc'h e ledimp tenzor,
Tensor hep par Soniou Arvor

Soniou Leon, ha re Wened,
Kerne, Treger hag an Naoned.

Re Vreiz-Uhel, ha Breiz-Izel,
Holl o c'hanimp a vouez uhel.

Re an Arvor, re an Argoad,
Didostaït, eta, tud vat!

*Diwar unan eus kanaouennou « Eun eured e
Bro-Wened ».*

GWIR VRETONED

Kanacuenn evid ar gouelieu brezonek

DISKAN : War dôn « Seiz Gwengamp » pe « Sao, Breiz-Izel »
KAN : War eun tön nevez.

Martiale

Gwir Vre-to-ned, tud a ga-lon, var zao! Da ga-na gloar da
Vreiz hor Bro, Ha da zi-ouall ten-zor he bu-ga-le: Ar yez, ar peoc'h, al
li-ber-té; Var zao, var zao! Da ga-na 'houez penn Breiz da vir-vi-ken! Breiz da
vir-vi-ken! O va Breiz gant da dou-riou brudet, Da vor glaz ha da ve-ne-
ziou, Da vruk ruz ha da lann a laou-ret, Te zo koant dreist an oll bro-iou!

DISKAN

Gwir Vretoned, tud a galon, var-zao!
Da gana gloar da Vreiz hor bro,
Ha da ziwall tenzor he bugale:
Ar yez, ar peoc'h, al liberte;
War zao! War zao!
Da gana ' bouez penn
Breiz da virviken! Breiz da virviken

bis,

I

O va Breiz, gant da douriou brudet,
Da vor glas ha da veneziou,
Da vruk rus ha da lann alaouret,
Te zo koant dreist an holl vroiou!

II

Ne deus ket, 'vel e-touez hor c'herreg,
A dud vat, seder ha nerzus;
Ne deus ket, 'vel en hor brezoneg,
Soniou drant, gwerziou dudius.

III

Hon tud koz, tud leal ha santel,
Start evel hon dero kalet,
A ouezas mirout da Vreiz-Izel
He brud-vat, he nerz, he gened.

IV

Bretoned, savomp hor c'halonou,
Ha touomp e tale'himp atao
Da vale var roudou hon tadou,
Keit ha ma 'z ay ar bed en dro.!


PAOTR TRÉOURÉ.



BRO GOZ MA ZADOU

(HENVELEDIGEZ)


Moderato War an ton kaer keumraeg : HEN WLAD FY NHADAU




Ni Breiziz a ga-lon, ka-romp hon gwir Vro! Bru-det eo an



Ar - vor dre ar bed tro - dro! Dis-pont 'kreiz ar bre - zel, hon



Ta - dou ker mad a skuil-haz e - vir - hi o go - ad.



O Breiz ma bro! me gar ma bro; Tre ma vo'r



mor 'vel mur'n he zro, Ra ve-zo di-ga-bestr ma bro!

Ni Breiziz a galon, karomp hon gwir Vro!
Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro!
Dispont 'kreiz ar brezel, hon tadou ken mad
A skuilhas eviti o gwad.

DISKAN

*O Breiz! Ma bro! me gar ma bro;
Tra ma vo 'r mor 'vel mur 'n he zro,
Ra vezo digabestr ma bro!*

Breiz, douar ar Zent koz, douar ar Varzed,
N'eus bro-all a garan kemend 'barz ar bed;
Pep menez, peb traonienn d'am c'halon zo ker:
Enno 'kousk meur a Vreizad têt!

Ar Vretoned a zo tud kalet ha krenv;
N'eus pobl ken kalonek a-zindan an nenv;
Gwerz trist, sôn dudius a ziwan eno;
O ! pegen kaer ez out, ma bro !

Mar deo bet trec'het Breiz er brezelioù bras,
He yez a zo bepred ken beo ha biskoaz;
He c'halon virvidik a lamm c'hoaz 'n he c'hreiz,
Dihunet out brema, ma Breiz!

TALDIR.



AN ALARC'H ⁽¹⁾

En amzer-ze e oa distag-kaer Breiz ha Bro-C'hall an eil diouz eben. Breiziz a oa mistri en o bro hag ar C'hallaoued en o hini, met brezel a oa e Breiz, tri bloaz war-nugent a oa, etre diou gostezenn, hini Yann Vontfort hag hini Charlez Bleiz. harpet, ar genta anezo, gand ar Zaozon hag eben gand ar C'hallaoued, o klask gouzout piou anezo o daou a zougje kurunenn Breiz, warlerc'h an Duk Yann III, marvet disher, d'an 30 a viz ebrel 1341.

Kostezenn ar Vontforted a jomas an trec'h ganti d'an 29 a viz Gwengolo 1364, pa voe lazet Charlez Bleiz, du-hont, war lanneier Alre, harp e Keranna.

Siouaz, trec'het war dachenn ar brezel, enebourien Yann Vontfort a labouras, dre zindan, hag a lakeas ar Vretoned d'en em zavel a eneb o duk, a rankas mont d'an harlu da Vro-Zaoz. Nebeud bloaveziou goudeze, pennou bras Breiz, pa weljont edo o bro o vont da veza staget ouz ar Frans, en em unanas hag a gasas eur c'hannad da Vro-Zaoz, da bedi Yann IV da zistrei: ober a eure e ziskenn e Dinard d'an 3 a viz cost 1379, da lavarout eo breman ez eus 550 vloaz, e kreiz ar bleuniou hag ar meuleudiou: Bretoned a hep renk a zire-das d'e zaludi. Intanvez Charlez Bleiz, Janned Penteur, hec'h unan, e giniterv-gompez hag e enebourez touet, betek neuze, a deuas da zaoulina dirazan hag a roas evelse eur skouer hep par o lakaat silvidigez ar vro da dremen a-raok pep tra hag eus an eil menez d'egile e klevjod o tregerni ar c'han-man, kan an alarc'h:

Eun a-larc'h, eun a-larc'h tre-mor, Eun a-larc'h, eun a-larc'h tre-mor, War lein tour moal kas-tell ar - vor! Din din daon! d'an em-gann! d'an emgann, o! din din daon! d'an em-gann ez an!

(1) Alarc'h = cygne, e galleg.

Eun alarc'h, eun alarc'h tremor,
War lein tour moal kastell Arvor!
Din! din! daon, d'an emgann, d'an emgann, o!
Din! din! daon, d'an emgann ez an!

Neveenti vat d'ar Vretoned,
Ha malloz ruz d'ar C'hallaoued!

Erru eul lestr e pleg ar mor,
E oueliou gwenn gantan digor;

Digouet an Aotrou Yann endro,
Digouet eo da ziwall e vro;

D'hon diwall diouz ar C'hallaoued,
A vres gwiriou ar Vretoned.

Ken e laosker eur youc'hadenn
A ra d'an aod eur grenadenn.

Ken e tassion meneziou Laz
Ha ken e trid ar gazeg c'hlas.

Ken e kan laouen ar c'hleier
Kant leo tro-war-dro, e pep ker!

Deuet eo an heol, deuet eo an hanv,
Deuet eo en dro an Aotrou Yann!

An Aotrou Yann a zo paotr mat
Ker prim e droad hag e lagad.

Gand e gleze ker krenv e tarc'h
Ken e taouhanter den ha marc'h.

Neb a drouc'h 'vel ma trouc'hez-te,
N'en deus aotrou nemet Doue!

Dalc'homp, Bretoned, dalc'homp mat,
Arzav na truez, gwad ouz gwad!

Skrigna 'ra bleizi Breiz-Izel.
O klevout embann ar brezel;

O klevout ar you e yudont;
Gant c'houez ar C'hallaoued e reont.

Paotred Bro-C'hall, 'lec'h ma kouezint
Betek deiz ar varn e kouskint.

An diveradur eus ar gwez
'Ray dour benniget war o bez!

EVOR HA KLOD DA WEN ARZAV
HA D'AN TRUBARDED MALLOZ RUZ

AN HINI GOZ

An hi-ni goz eo va dous An hi-ni goz eo
 sur Ha koulskoude war a welan an hi-ni
 , yaou-ank ar vraoan.

DISKAN

An hini goz eo va dous,
 An hini goz eo sur!

1

Ha koulskoude, war a welan,
 An hini yaouank ar vraoan.

2

An hini yaouank a zo koant
 An hini goz he deus arc'hant.

3

Me ne dan morse d'ar mare'had
 Na ro d'in-me gwerz boutailhad

4

An hini goz am c'hondu mat
 An hini goz a zo d'am grad.

5

Ha koulskoude ebarz e kêr,
 An hini yaouank a gerer.

6

An hini yaouank zo ker sounn,
 An hini goz eun tammig kroumm.

7

An hini yaouank zo lijer
 An hini goz a zo pounner!

8

An hini goz he deus bleo gwenn
 An hini yaouank bleo melen.

9

An hini goz liou radenn sec'h,
 An hini yaouank liou an erc'h.

10

Liou an erc'h eo hag hi ker yen
 Ma ne zell ket ouzin hepken.

11

Ha koulskoude, n'ouzoun perak,
 Va c'halon 'ra tik-tak, tik-tak!

12

Tik-tak a ra va c'halon baour
 Pa 'z an da skei war doull an neur.

13

Tec'h alese, tec'h kuit, tec'h pell ;
 An hini goz a zo kant gwell.

14

An hini goz a zo kant gwell
 Ne ra ket tailhou dimezell.

15

Diaket an dimezelled,
 Diaket e teir rann ar bed.

16

Dimezelled ne reont hepred
 Nemet goab eus ar Vretoned

17

Pa daolan dourn war benn he glin,
 An hini goz a c'hoarz ouzin.

18

An hini goz 'zo Bretonnez,
 An hini yaouank 'zo Gallez.

19

Fae eo ganen gand ar Gall brein
Gant kroc'hen an diaoul war e gein.

20

Fae eo ganen gand ar C'hallez
Ganti karnou en he botez.

21

Goude tri dez e skuiz pep den
Gant glao, avel ha merc'h estren.

22

Ma komzit a vriedelez
Komzit d'in eus eur Vretonez.

23

Ne rafen van pa ve laret
Eo ar Vretonez grac'hellet.

24

Vitan da veza grac'hellet
Eun aval blas fall n'en deus ket.

25

Bezef droug gant neb a garo
Trouc'het an eost, dournet e vo.

26

Bezef droug gant neb a garo,
Va dous ha me ni eureujo.

27

Ni gousko en eur gwele kloz,
War ar pell fresk, hep noz, bep noz.

28

Ha pa ve ker koz hag ar bed
Ganen e vezo gwalennet.



SAV, BREIZ-IZEL

KOMZOU J. LE BAYON. — TON J.-P. DANTEC

De-tu e- chu an noz Splannât a
ra an de ar c'hloc'h a dint c'hoaz eur wech
an A-ve Sav Sav Breiz-Izel bro hep
par An heol a strew e splann-der war an douar
Sav Rak me glev kan lir- zin. al
la-bou-der di-hun holl en dro d'in

Setu echu an noz, splannât a ra an de
Ar c'hloc'h a dint c'hoaz eur wech an Ave.

DISKAN

Sav, sav,
Breiz-Izel, bro hep par,
An heol a strew e splann-der war an douar
Sav

Rak me 'glev kan lirzin
Al laboused dihun holl en dro d'in.

Ar voualc'h er bod spern a c'houtell d'ar mintin
Bugale Vreiz a gouez war an daoulin.

Ar gliz o deus fuilhet perlez dre an douar
An heol o c'hutuilho diouz beg ar barr.

Ar segal er parkou kent pell a vo melen
Ne vanko ket c'hoaz bara da vab-den.

Arvor, douar karet, mirit ho pugale,
Nerz 'vid an deiz o do digant Doue.

GAVRIG AN HANV

TON H. GUILLERM.

Métroome ♩ = 52.

Bim - baon ! ga - vrig an hanv, Pe-
lec'h out bet e - pad ar goanv ? En eun toa - lig
en dou - ar, o c'he - dal an am - zer glou - ar.

1

Bimbaon! gavig an hanv,
Pelec'h out bet epad ar goanv?
— En eun toullig en douar,
O c'hedal an amzer glouar.

2

Bimbaon! gavig an hanv,
Petra 'ri, breman, en hanv-man?
— Meuli Doue am savas
Ha douar hor Breiz am magas.

3

Bimbaon! gavig an hanv,
Ha Petra 'ri c'hoaz, en hanv-man?
— Kana drant va c'hanaouenn,
Da lakat holl Vreiziz laouen.

4

Bimbaon! gavig an hanv,
Ha Petra 'ri c'hoaz, en hanv-man?
— Karout va gloc'h karadek
Ha va neiz kuzet en havreg.

5

Bimbaon! gavig an hanv,
Ha Petra 'ri c'hoaz, en hanv-man?
— Deski d'am evnedigou
Nijal war o eskelligou.

6

Bimbaon! gavig an hanv,
Ha Petra 'ri c'hoaz, en hanv-man?
— Diouall ouz fazi marvel
O tec'hout diouz skoul ha sparfel.

7

Bimbaon! gavig an hanv,
Ha Petra 'ri c'hoaz, en hanv-man?
— Klask eun toull kuz da vervel,
Pa deui Doue d'am gervel.

8

Bimbaon! gavig an hanv,
Fur out, e-skoaz kalz a dud skanv!
— Bepred e ran youl Doue,
Warnomp holl Hen eo ar Roue.



VA ZI BIHAN

A bep tu om eus re-det, da
 glaski an eu-ru-ted, da glaski la-bour. Da c'hounit va
 bara. Met d'ar gêr pa zis-tro-an, em
 c'halon e tan-van ar bli-jadur, al le-ve-nez
 vras. da laka deun a-vel da c'houe-za ar
 mor da eo-nen-na. Pa zi-roll an holl drou-gou er
 go-anv, o nag eo du-di-ud chom er
 gou-dor haer eurus. E va zi bi-han ha-ran-
 -te-zud

:- Diokan:-

O! me da gar, ti va za-dou Mui
 - o! hi e-ged an holl den-jo-riou kar-get la-ouen
 a dile-ri-jenn 'di Koz, te zo' vel eur ba
 -ra - doz.

I

A bep tu, em eus redet,
 da glask an eurusted,
 da glask labour, da c'hounit va bara
 Met d'ar gêr pa zistroan,
 En c'halon e tanvan ar blijadur,
 al levenez vrasa.
 Pa deun avel da c'houeza,
 ar mor da conenna,
 Pa ziroll an holl drougou er goanv,
 O! nag eo dudius,
 chom er goudor, kaer, eurus,
 Em zi bihan ker karantezus.

II

Ro digemer d'ar bugel
 dizroet d'e gavel,
 ro d'in nerz, deus da floura va c'halon!
 Me wel aze, dem-guzet,
 Va c'hadorig vourret
 he divrec'h astennet warzu ennon.
 An horolaj o seni
 a sko 'vel kaniri
 hag a laka va gwad holl da virvi.
 O! va zi benniget
 da vouse'hoarzhou entanet
 a laka da dridal va spered.

PAOTR TRÉOURÉ.

Alc'houez an Eurusted

Pa oan em zri-ouec'h vet bloa-vez plac
 chig hep nec'h e-bet Plac'chig hep nec'h
 e-bet e voe ro-et d'in our al-
 c'houez, al-c'houez an eu-rus-ted e-ted

1

Pa oan em zriouec'hvet bloavez,
 Plac'hig hep nec'h ebet (2 w.)
 E voe roet d'in eun alc'houez,
 Alc'houez an eurusted. } (2 w.)

2

Ha setu me aet dre ar vro,
 Hag em dourn an alc'houez,
 Evit klask er bed tro ha tro,
 Dor gaer al levenez.

3

War an hent bras hir a heulien,
 Pell diouz bro an Arvor,
 Eus an eurusted a glasken,
 Ne gaven ket an nor.

4

Skedet he deus va braoentez,
 En tiez alaouret,
 Met va naon gant o holl danvez,
 Biskoaz n'eo bet torret.

5

Livirit d'in, tudchentil vat,
 E pelec'h 'vo rekis
 Redek 'vit ma c'hellin tanvaat
 Hunvre va yaouankiz.

6

P'her c'havoc'h, tost da benn ar bed,
 Kuzet gant ar gwez bras,
 Mammenn an daerou 'vo hesket,
 En ho taoulagad glas.

7

Setu-me, eun deiz, digouezet,
 Kroummet gand ar gozni,
 E-tal eun ti, hanter-gouezet,
 Goloet a ginvi.

8

Gant an alc'houez e tigoris
 Dor an ti hep toenn,
 Ha war an oaled e welis
 Lec'h va c'havellig gwenn.

9

Anaout a ris va zi a-benn ;
 Ennan em' eus kresket,
 Ennan, va mamm, war he barlenn,
 He deus va luskellet.

10

Kouezet eo va zi tamm ha tamm,
 Va eurusted ivez.
 An eurusted ha ti va mamm
 N'o deus met eun alc'houez!

J. LE MARÉCHAL.



Paotr e C'hallek plat

Var don Ar Pilhaouer.

Allegretto.

Va mi-gnon Yan nig da-zen-nek A zo
 brad ha leun a c'hloar, A zo brad ha leun a
 c'hloar. Mez en deuz O komz bre-ze-neg ha ger
 gal. leg mat ne oar, Foei var-nan gante vern
 ar-dou gal. leg sot leiz e che-nou.

Va mignon, Yannig Lazennek,
 A zo bras ha leun a c'hloar; (bis)
 Mez en deus o komz brezoneg,
 Ha ger galleg mat ne oar.

DISKAN

Foei warnam gant e vern ardou,
 Galleg sot leiz e c'henou !

Pa 'z an gantan d'ar pardonioù
 Ne fell ket d'am c'hamarad (bis)
 Gant aoun da freuza e c'henou,
 Komz er yez a gomz e dad.

Bet omp e pardon Keraez,
 O redek ar staliou kaer ;
 Me oa tapet genaouez
 E kichen ma Yannig kouer !

Dirak peb stal e lavare :
 — « Regard' comm' ché bo tout ça !
 « Jeannett', je vais te regalé,
 « Prends tout che que tu voudras ! »

Ha pa grogen en dister dra :
 — « Laiché cha, viens donc plus loin. »
 Hag erru e ti Jaketa :
 — « Rentrons pas dans che chal coin ! »

Prena 'ra koz soniou gallek
 'N eur grial : « Ché ben, ché bon ! »
 Pa ginniger d'ean brezoneg :
 — « Je sais pas lir' du breton. »

Savet droug, pelloc'h, ennon-me,
 E prenis seiz kanaouenn,
 Ha me rei e zac'h d'an den-ze :
 — « Kerz d'ar gêr da zeski lenn.

« Mez em eus ganez, pladennek,
 « Ha te savet er vro-man
 « A ra fae war ar brezoneg,
 « Goude n'ouzout nemetan ?

« 'N deiz bennak, me, ma timezan,
 « N' roin ket d'id-te ar maout ;
 « Gwelloc'h ganen kaout eur pagan,
 « Eur pastor pe eur paotr saout. »

M'ho pije gwelet ma lapous,
 An daelou 'n e zaoulagad,
 O vont kuit, lostek ha pikous,
 C'hoarzet ho pije m'oar vat.

Grit eveldon, merc'hedigou,
 Ha c'houi welo a bep tu
 Kement hini a zoug bragou
 O komz brezoneg dioc'htu.

Pa 'z eus diou yez e Breiz-Izel,
 Evit ma 'z ay mat an traou,
 E vo red deomp en eur zevel
 O deskit, ervat, o diou.

Ha ma rankit komz e galleg,
 Na gomzit ket hini plat,
 Ha pa gomzoc'h e brezoneg,
 Distagit brezoneg mat.

JANIG KOAD-AR-FAO.

AN EOSTERIEN

Moderato

Daoust ma teu brinji gouez da
 skrabat hon hajou, Er parkeier ar
 frouez a c'holo an nan-chou Er
 parkeier ar frouez a
 c'holo an nan-chou

Ar zon-man, savet war eun ton koz, dastumet gant
 Bourgault-Ducoudray, a dle beza kanet gand eur strol-
 lad kanerien.

Daoust ma teu brinji gouez
 Da skrabat hon hajou,
 Er parkeier ar frouez
 A c'holo an nan-chou.

Ar glao, an heol benniget
 Ha poan ar c'houeriad,
 A roio d'eomp, Bretoned,
 Bara, eur bloaveziad.

Tridomp, eta, gant dudi,
 Pa welomp o sevel,
 Eost founnus, daoust da gozni
 Douarou Breiz-Izel.

Holl, dourn ha dourn unanet,
 Poaniomp, gant levez
 Da hada e pep spered
 Had ar vuhez nevez.

LOEIZ LOKOURNAN.

ANGELUS AN NOZ

Hen: Sell, eus e dron, an heol a gouez Me a wel
 c'hoaz, a-dreuz ar gwez, E lagad ruz o luger-
 ni, an noz a doo-ta tiz warni. Hi: E c'hoad ar
 bleun hag an de-liou, Bep an tamm
 mig a goll o liou Ha dre ma tua ar me-
 nez Ec'h e naou tour-tan an e- nez

Hen. — Sell eus e dron an heol a gouez ;
 Me a wel c'hoaz, a-dreuz ar gwez,
 E lagad ruz o lugerni,
 An noz a dosta, tiz warni.

Hi. — Er c'hoad, ar bleun hag an deliou,
 Bep an tammig, a goll o liou,
 Ha dre ma tua ar menez
 Ec'h enaou tour-tan an enez.

Hen. — Ar mor a baouez da c'hourdrouz,
 Al labous ne ra mui a drouz,
 An avel hepken, heb ehan,
 Goustadik a zistag he c'han.

Hi. — Ennan kant ha kant goulaouen,
 Nag an oabl doun a zo laouen,
 E lizerennou aour warno
 Doue 'n deus skrivet e ano.

Hen. — Pa zeu ar bed holl da devel,
Na kaer eo klevout o sevel
Mouez ar c'hloc'h, ker c'honek e vennoz
Pa zon e Angelus d'an noz.

Hi. — D'hol labour tenn roomp arzao,
Hah en dachenn hon-daou war zao
Meulomp Mari a vouez uhel,
Evel m'he meulas an Arc'hel.

Hen. — Hon-daou, te ganen, me ganez,
Stouomp dirak hor Rouanez,
Gant he Doue krouet dinamm,
Gantan dibabet evit Mamm.

O daou. — « Salud, o Mari, leun a c'hras,
Dreist an holl, Doue ho karas ;
Salud, o Mari, leun a beoc'h,
An Aotrou Doue 'zo ganeoc'h.

Dreist ar gwrazez oc'h benniget,
Rak Mab Doue hoc'h eus douget,
Ha Jezuz, o kaerat ano,
Morse da ren ne ehano.

O Santez Mari, Mamm Doue,
Mamm ho Krouer hag ho Roue,
C'houi an hini a zaludomp,
Pedit-Hen bepred evidomp.

Pedit, Mamm druezus meurbed,
Evit holl bec'herien ar bed,
Breman, e-kreiz ar stourm garo,
Ha dreist-holl da eur ar maro. »

Hen. — Ha pedet ganeomp hor mamm ger,
Dienkrez baleomp d'ar ger,
Ouz Mari neb en em erbed,
A c'hell bale heb aoun ebed.

Hi. — Gant he Mab Jezuz ha ganti
E vezo diouallet an ti ;
En o c'haloun, en o envor,
E tougont bugale Arvor.

J. L'HELGOUALCH.

EIL KEVRENN

Sonjioù
evit tud yaouank

AN HOLLAIKA

Kanaouenn ar vesaerien e Kerne; hanvet eo an hollaika dre m'ema ar c'hiz gand ar re a stag gand ar c'han-ze da lezel alies, a bouez penn, ar youc'hadenn : Hollaika, hollaika !

Di-sul vin-tin dal ma sa-vis
Da vont gant va saout er maez me gleveva
Dous o ka-na a-nat mat oa diouz he
mouez me gle-ve va dous o ka-na
ka-na ge-war ar me-neg ha me mont da
ze-vel eur zon da ga-na ganti i-vez

HEN

Disul vintin, aba savis da vont gant va saout er maez,
Me ' gleve va dous o kana, anat mat oa diouz he mouez;
Me ' gleve va dous o kana, kana ge war ar menez,
ha me ' mont da zavel eur zon da gana ganti ivez.

Ar genta gwech ma 'm eus gwelet Marc'haridig, va mestrez,
oa oc'h ober he fask kenta e-barz iliz va farrez,
E kreiz tre, barz iliz Fouesnant edo gand ar vugale,
D'ar pred-se he doa daouzek vloaz ha me daouzek vloaz
[ive.

Evel bleun melen ar balan, pe 'vel ar rozennig c'houez,
'Vel ar rozenn c'houez ' kreiz al lann, oa etrezo va mestrez.
Tra m'oa padet an oferenn, met sellet outi ne raen,
Ha seul-vui ma sellen outi ha seul vuioc'h he c'harien.

Me 'm eus eur wezenn em liorz 'zo karget a avalou,
Hag eun dachennig c'hlas dindan ha tro-war-dro boden-
[nou,

Pa deuo va dousik koantik, va muia karet d'am zi,
Ni a yelo da zisheolia, va dous ha me dindanni.

An aval rusa a dapin hag eur boked 'rin 'viti,
Hag eur rozinil a garan a lakin ivez d'ezi
Eur rozinilig gwall wenvet, abalamour d'am enkreuz
rak n'm eus ket bet c'hoaz diganti eur pok a wir garantez.

HI

Tavit, gant ho son, va mignon, tavit prim gant ho komzou,
An dud o vont d'an oferenn 'zo en traon ouz hor selaou,
Eur wech all pa zeuimp d'al lann, pa vimp hon unan hon
[daou
Eur pokig a wir garantez 'roin d'eoc'h, unan pe zaou!

BARZAZ BREIZ.



AN ASTRILHAD

Ha pa oan me bi-han, ne oan ket bras
 tur ma-li-tek, O ge lan la! Ha me zay da c'hoari d'ar
 pra-dou glas, tur ma li tek o la War-
 c'hoaz war-c'hoaz, Ha me zay me a-tao da
 c'hoari war ar stou-ren ge! Ha!
 me zay me a-tao da zan-eal d'ar pe-a-jou glad

I

Ha pa oan me bihan ne oan ket bras,
Vantur maliret o ge lan la!
Ha me 'yel da c'hoari d'ar pradou glas.
Vantur maliret o la.

DISKAN:

Ware'hoaz, ware'hoaz, ware'hoaz!

(an hekleo a respont)

Ware'hoaz, ware'hoaz, ware'hoaz!

A! me 'yel me atao da c'hoari war ar flourenn ge!
A! me 'yel me atao da zansal d'ar pradou glas!

II

Graet em eus al louarn kalz a zeiziou,
Evit redek ar c'had er menezioù.

III

Va flijadur vrasa e oa neuze
Kana ha c'houtellat epad an de.

IV

Allaz, ne oan ket me eur bugel mat,
Met ne oa ket va far da flaouitat!

V

Ha pa oa eur banvez war ar pave,
O! Malaskoad! Velkent, na me 'zailhe!

Dastumet gant Dihunamb.



AR WERZID ARCHANT

Eun deiz ma ker-zen war bonk ar vi-
-lin, gé lin deiz ma ker-zen war bonk ar vi-
-lin e oan o ne-za o ne-za o ne-
-za e van o ne-za va stec'henn lin e oan o ne-
-za o ne-za o ne-za e van o ne-
-za va stec'henn lin

2

E oan o neza va stec'henn lin, gé (2 wech.)
Kouezas va gwerzid, va gwerzid, va gwerzid,
Kouezas va gwerzid arc'hant diouzin (2 w.)

3

Kouezas va gwerzid arc'hant diouzin, gé (2 w.)
Eur paotrig koantik, ha koantik, ha koantik,
Eur paotrig koantik hen tapas d'in (2 w.)

4

Eur paotrig koantik hen tapas d'in, gé! (2 w.)
Hen a c'houlennas, c'houlennas, c'houlennas,
Hen a c'houlennas eur pok ouzin. (2 w.)

5

Eur pok, den yaouank, n'ho pezo ket, gé (2 w.)
Rak ma oar va mamm, va mamm vat, va mamm vat,
Ma oar va mamm vat, e vin fouetet. (2 w.)

6

Rak ma oar va mamm, e vin fouetet, gé (2 w.)
Ma oar va zad paour, va zad paour, va zad paour,
Ma oar va zad paour e vin kannet. (2 w.)

7

Piou 'zo war an dro hag a ouesfe ? gé (2 w.)
Nemed an evned, an evned, an evned,
Nemed an evned, e lein ar gwe. (2 w.)

8

An evnedigou a zo skoliet mat, gé! (2 w.)
Int a oar galleg, ha galleg, ha galleg,
Int a oar galleg ha latin mat. (2 w.)

9

Int a oar galleg ha latin mat, gé! (2 w.)
Hag a yel d'ar gêr, ha d'ar gêr, ha d'ar gêr,
Hag a yel d'ar gêr da flateat, gé (2 w.)

10

Hag a yel d'ar gêr da flateat, gé (2 w.)
Hag a ray kanna, ha kanna, ha kanna,
Hag a ray kanna merc'hig va zad. (2 w.)

KLASKOUR DIHUNAMB.



Va Dousig koant

Moderato

Va dou-sik koant o ya dra zur, va dou-sik
 koant o ya dra zur, c'houi ra-se 'in kalz pli-ja.
 -du Dam da ram da la da ma c'hell-fen
 ho la-tem-pie-di Dam da ram da la di

Hen. — Va dousig koant, o ya, dra zur (2 vech)
C'houi rafe d'in kalz plijadur,
Dam da ram da la da,
Ma c'hellfen ho tarempredi
Dam da ram da la di.

Red e vo d'eomp-ni, va mestrez (2 w.)
Mont d'ar pardonioù allies,
Dam da ram da la da,
Evit gellout 'n em zidui,
Dam da ram da la di.

Hi. — N'eo ket red mont d'ar pardonioù (2 w.)
' Vit kaout eleiz a ehatou.
Dam da ram da la da,
Gwell eo ganen teufec'h d'am zi
Dam da ram da la di.

Hen. — Ma na dafe den d'ar pardonioù (2 w.)
Chomfe ar per, an avalou,
Dam da ram da la da,
Ne vefent gwerzet da hini
Dam da ram da la di.

Hi. — M'ho trugareka, servicher, (2 w.)
 'Meus defot avalou, na per,
 Dam da ram da la da,
 M'ho peus arc'hant, mirit int-i,
 Dam da ram da la di.

Hen. — Livirit d'in ta, va mestrez, (2 w.)
 C'houi 'gernerfe priedelez?
 Dam da ram da la da,
 Ha c'houi 'gavfe aes dimezi
 Dam da ram da la di.

Hi. — Dimezi a zo trubuilhus (2 w.)
 Eur plac'h yaouank 'zo ehatu.
 Dam da ram da la da,
 Eun den yaouank 'zo dizoursi,
 Dam da ram da la di.

Hen. — Ma chomfe an holl tud yaouank (2 w.)
 Ar bed a vefe kalz re frank
 Dam da ram da la da,
 Red mat eo d'an dud dimezi
 Dam da ram da la di.

Hi. — Nag a bed hini 'vez gwelet (2 w.)
 Er briedelez enkrezet
 Dam da ram da la da,
 Ha ganto gwall verr ar peuri
 Dam da ram da la di.

Hen. — Ken'vo va mestrez, a laran, (2 w.)
 Houman eo va c'homz divezan,
 Dam da ram da la da,
 Birviken n'en em welimp mui
 Dam da ram da la di.

Hi. — Deuit, gounezet oun, m'hen tou, (2 w.)
 Va dousig koant, gant ho komzou,
 Dam da ram da la da,
 Ma 'z aimp hon daou da zimezi
 Dam da ram da la di.

Dastumet gant F. M. e Scrignac.

SON HELENA

Ar Verc'h.
Allegretto $\text{♩} = 104$

m.f. Mamm, ma fell deoc'h va di-me-gi deuz
 bou-lan-ger n'gom-zit ket d'in.
 ar Vamm:
 Se-rak e-ta, He-lena? Se-rak e-
 ta, va merc'h Se-rak e-ta

I

AR VERC'H

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,
 's eur boulanjer, n' gomzit ket d'in.

AR VAMM

Perak eta, Helena,
 Perak, eta, va merc'h, perak eta?

II

AR VERC'H

Eur boulanjer a fouet e doaz
 Hag a hell ober d'in ker gwaz!

AR VAMM

Ya! re wir eo, Helena,
 Ya, re wir eo, va merc'h, ya! re wir eo!

III

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi
 Eus eur c'higer n' gomzit ket d'in. (1)

(1) Lakat komzou ar vamm ar « Perak, eta Helena » hag ar « Ya! re wir eo Helena », bep eil, warlerc'h koubladou ar verc'h evel m'int laket warlerc'h ar c'henta hag an eil koublad.

IV

Eur c'higer 'zo kriz a galon
Am c'hemerfe e lec'h eul lon.

V

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,
's eun tavnour, n' gomzit ket d'in.

VI

Eun tavnour a rafe d'in
Chom, heb ehan, e stal ar gwin.

VII

Mamm ma fell d'eoc'h va dimezi,
Eus eur c'harrer n' gomzit ket d'in.

VIII

Gand e vinviou, eur c'harrer
A vouzarfe tud ar c'harter.

IX

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,
's eur mansoner, n' gomzit ket d'in.

X

Eur mansoner, a gêr da gêr,
Vez' foueta pri ouz ar voger.

XI

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,
Eus eur c'halvez, n' gomzit ket d'in.

XII

Gand e vouc'hal vras ar c'halvez,
Am faoutfe, penn-da-benn, ken aes.

XIII

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,
's eul labourer n' gomzit ket d'in.

XIV

Bepred er park gant labourer
'vit eur vaouez tenna micher.

XV

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,
's eur c'hantonier n' gomzit ket d'in.

XVI

Ar c'hantonier, o poania tenn,
A vec'h ma c'hounit e damm kreun.

XVII

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,
's eur c'hemener n' gomzit ket d'in.

XVIII

Eur c'hemener ne deo ket den,
Nemet kemener ne deo ken.

XIX

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,
Eus eun toer n' gomzit ket d'in.

XX

An toer, war an toennou
Zo' risk da derri e vemprou.

XXI

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,
A baotr ar gov n' gomzit ket d'in.

XXII

Mab ar gov du ouz e vegin
A zo re zonjerus e vin.

XXIII

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,
's eur miliner n' gomzit ket d'in.

XXIV

Ar miliner eo laer ar bleud
A vo daonet beteg e veud.

XXV

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,
's eur gwiader n' gomzit ket d'in.

XXVI

Eur gwiader, e peb amzer,
Ne oar nemet liva gevier.

XXVII

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,
Eus eur c'here n' gomzit ket d'in.

XXVIII

Kement kere am eus gwelet,
Penn-da-benn a oa mac'hagnet.

XXIX

Mamm, ma fell d'eoc'h va dimezi,
A vab ar markiz komzit d'in.

XXX

Mab ar markiz en deus arc'hant
Ma 'm goulennfe 'vefen kontant.



Soazig

Ton savet gant an A. MAYET.

E miz mae pa vez an heol skler pa gan
ar voualc'h an alc'houe - der E sa -
- vad soa - zig min-tin mat Ha bu -
- an wis-kas he dil-had

I

E miz mae, pa vez an heol skler,
Pa gan ar voualc'h, an alc'houeder,
E savas Soazig, mintin mat,
Ha buan 'wiskas he dilhad.

II

Koef lien war he bleo melen,
Brozig marellet, lerou gwenn :
Ha da redek dre ar parkou,
Da gutuilh a bep tu bleuniou.

III

Skanv ha laouen, glebiet he broz
E mesk ar geot, gand ar gliz-noz,
O ! m'ho pijs gwelet Soazig !
Doue ! koantat m'oa ar plac'hig !

IV

Ar c'helien-aour, ar melvennou,
Kenkouls hag an evnidigou,
A zarnije a-uz d'he fenn
Pep-hini gand he c'hanaouenn.

V

Ma lavarent d'ez: « Deiz mat!
 « Deiz mat, plac'hig, ken skanv a droad!
 « ' Vidout eo ken kaer ar bleuniou,
 « ' Vidout e kanomp hor soniou ! »

VI

Hag an heol-sav, ouz he gwelet
 Ker koant, ker koant, 'oa souezet,
 Ha mezek, me gred, eun tammig,
 Trec'het ma oa gand eur plac'hig.

VII

Skanv ha laouen, glebiet he broz
 E mesk ar geot, gand ar gliz noz,
 O ! m'ho piye gwelet Soazig !
 Doue ! koanta m'oa ar plac'hig.

*F. V. an Uhel
 Bepred Breizad.*



MONA

Adagio assai 63-4

War lez ar ster he zreid en dour a-ze
 zet war ar c'hla zenn flour eun a-bar
 daez - Mona zaou-lad oa er
 prad din-dan ar wern e' hla.

War lez ar ster, he zreid en dour,
 Azezet war ar c'hlazenn flour,
 Eun abardaez, Mona Zaoulaz
 Oa er prad, dindan ar wern c'hlas.

Truezus ha stouet he fenn,
 'Oa ar plac'hig, gant he anken ;
 An daerou eus he daoulagad
 'Steredenne war geot ar prad.

War ar skour eun evnig bihan
 'Lavaras neuze, dre e gan :
 — N' strafuilhit ket an dour, plac'hig,
 Er giz-se gant ho taou droadig.


Rak n'hellin mui gwelet va skeud,
 Na stered an oabl ken nebeud :
 Selaouit pedenn an evnig,
 N' strafuilhit ket an dour, merc'hig!

Monig a lavaras neuze
 D'an evn a gomze er stumm-ze :
 — N'az pe doan, an dour strafuilhet,
 Hep dale pell 'vez sklaer ha net ;

Met, siouaz! en deiz ma teui
 El lec'h-man gant Yannig Karis,
 An hini am eus re garet,
 A ! neuze ez oa d'it laret :

O! na strafuilhit ket, Yannig,
 Kalon hag ene ar plac'hig,
 Ne vint ket glan, ne skeudint ket
 Ar stered, an heol benniget.

F. V. an Uhel.
 Bepred Breizad.



Loeizaig ha Perig

U-zet em eus va bou-tou toul-lek meud va le-rou,
 toul-lek meud va le-rou O vont d'oc'h heul pen-herrez
 ge ge ge fin la din de-nik O vont d'oc'h heul pen-herrez
 a glaskan da veo. trez.

PERIG

Uzet em eus va boutou
 Ha toullet va loerou, (bis)
 O vont d'hoc'h heul, pennherez,
 Ge ge ge fin la din de nik,
 O vont d'hoc'h heul, pennherez,
 A glaskan da vestrez.

Loeizaig, pa 'z in me d'ho ti,
 D'ho klask da zimezi, (bis)
 Roit d'in eur respont vat,
 Ge ge ge fin la din denik,
 Roit d'in eur respont vat,
 Evel ho mamm d'ho tad.

LOEIZAIG

Respont a rin, den yaouank,
 D'eur goulenn 'zo ker koant (bis)
 Ne livirin gaou ebet,
 Ge ge ge fin la din de nik,
 Ne livirin gaou ebet,
 Dimeurz, vin eureujet.

Dimeurz e vin eureujet.
 Diwezat oc'h deuet (bis)
 Rak eun all en deus hadet
 Ge ge ge, fin la din denik,
 Rak eun all en deus hadet
 Em liorz ar bleun eured.

PERIG

Hadet ganen e oant bet,
 C'houi oc'h eus o zennet, (bis)
 Breman p'o gwelan gwenvet
 Ge ge ge, fin la din denik,
 Breman p'o gwelan gwenvet
 Va c'halon zo rannet.

PENNHÉREZ PENN-AR-ROZ

The musical notation consists of four staves of music in a 2/4 time signature with a key signature of one flat (B-flat). The lyrics are written below the notes. The lyrics are: "Me am euz eur ves-tre-zik e Pen-ar-roz. Me am euz eur ves-tre-zik e Pen-an-roz. Hag e re-din the gwelet her mui gor. roz Hag e re-din the gwelet di-oul da roz."

Ha mar teuez d'am gwelet va c'hloareg koant, (bis)
 Me 'n em droio en eur pesk er stêr arc'hant ;
 N'ez pezo ket va c'haloun hervez da c'hoant
 Mar 'n em droes en eur pesk 'vel ma lârez, (bis)
 Me 'vezo pesketaer, ô va mestrez!
 Me 'basketo va dousig dre garantez.
 Mar teuez d'am fesketa ha d'am spouron, (bis)
 Me 'n em droio en heiez er c'hoajou doun
 N'ez pezo tam, kloaregig, eus va c'haloun.
 Mar 'n droez en heiez 'vel ma lârez, (bis)
 Me a vezo chaseour, ô va mestrez !
 Me chaseo va dousig dre garantez.
 Mar teuez d'am chaseal, 'riskl d'am muntri, (bis)
 Me 'n em raio leanez 'n eun abati;
 N'ez pezo ket va c'haloun, ô kloareg kri.
 Mar 'n em reez leanez, 'vel ma lârez, (bis)
 Me a yelo da vanac'h, ô va mestrez!
 Me govesay va dousig dre garantez.
 Ha mar teuez d'am c'hovez, oueli c'houero, (bis)
 Gwenn-kann maro em gwele te am c'havo,
 Roïn ket d'it va c'haloun, kaer az pezo.
 Mar da gavan gwenn-marô ez kwele kloz, (bis)
 Lec'h Sant Per a gemerin er Baradoz,
 D'hen digeri d'am dousig eus Penanroz.

CHARLEZ AR BR S

War bont an Naoned

Ton dastumet gant an A. GUILLERM.

The musical score is written in G major and 4/4 time. It consists of five staves of music. The lyrics are written below the notes. The first staff begins with 'P'e. don war bont an Naoned di. ge. don lan.' The second staff begins with 'li. ra P'e. don war bont an Naoned di. ge. don lan'. The third staff begins with 'la En deiz all O kana di. ge. don lan'. The fourth staff begins with 'li. ra En deiz all O kana di. ge. don lan'. The fifth staff begins with 'la'.

1

P'edon war bont an Naoned,
En deiz all o kana.

2

Me gwelet eur plac'h yaouank
Lez ar ster o ouela.

3

Ha me o c'houlenn outi
— : Na perak e ouele ?

4

— « : Va gwalenn aour, emezi,
Er mor a zo kouezet. »

5

— : Petra rofet-hu d'in-me,
Me velo d'he zapa !

— 54 —

— : Hanter kant skoued, emezi,
'roin deoc'h, a galon vat.

7

'Vid ar genta plonjadenn
Netra n'en deus gwelet.

8

Vid an eilvet plonjadenn
Ar walenn zo touchet.

9

Vid an drede plonjadenn
Ar paotr a zo beuzet.

10

E dad a oa er prenestr
Ha diroll da ouela.

11

— : Tri mab am eus me ganet
O zri ez int beuzet.

12

— : E bered sakr an Dreinded
O zri e vint beziet.



Kabiten Sant-Malo

Pas trop vite.

Va mamm ga-neoc'h e c'houlennan, lu, ra
 Va mamm ga-neoc'h e c'houlennan
 Va mamm ga-neoc'h e c'houlennan
 Di-me-zi zin pe na ne ran

1
 Va mamm ouzoc'h e c'houlennan
 Lura
 Va mamm ouzoc'h e c'houlennan,
 Dimezi 'rin ya pe ne ran?

2
 Chansou a-walc'h c'hoaz a gavan
 Lura
 Chansou a-walc'h c'hoaz a gavan
 Tri faotr yaouank hag intanv

3
 Tri baotr yaouank hag eun intanv.
 Lura
 Tri baotr yaouank hag eun intan
 Kabiten Sant-Malo, mar karan.

4
 Va mamm n'am aliit ket fall,
 Lura
 Va mamm n'am aliit ket fall,
 Va dimezit 'vel ar re all.

Bleuniou o tremen

Pa oan er min-tin-man o vont da ger-c'hat
 dont Pa oan er mi-tin-man o
 vont da ger-c'hat dour, E kle-viz an eos-
 -tig er c'hleuz o ka-na flour E
 kle-viz an eos-tig er c'hleuz o ka-na
 flour.

I
 Pa oan, ar mintin-man, o vont da gerc'hat dour,
 E klevis an eostig er c'hleuz o kana flour.

II
 En e zon e lare, kuzet gant an deliou :
 « Dre ma astenn an hanv e koll ar bleun o liou.

III
 « Miz mae zo aet en dro gand an nevez-amzer,
 « Breman gwrez an heol tomm d'ar bleun zo re
 [bounner.

IV
 « Bleuniou pet ac'hanoc'h a wenv bemdez breman,
 « Bleuniou koant o tremen buan diouz ar bed-man.

V
 « Ne chom ket pell ar bleun da deure! o c'houez vat :
 « Ret eo d'ezo kuitat, gwenvi, tremen timat.

VI

« Ar rozenn bet ker fresk a zizec'h war he bod :
« Pennherez Kerbendrez a zisliv ruz he jod.

VII

« Eurus ! o ya ! eurus an neb a varv yaouank !
« War e vez e vernier ar bleuniou stank-ha-stank.

VIII

« Eurus eo ar werc'hez a dremen 'vel ar roz,
« He c'houez glan ouz he heul a bign d'ar Baradoz ! »

IX

Hag an eostig gant herr a dec'has dirazon,
En eur gana sioulik diweza poz e zon.

X

Pennherez Kerbendrez a varvas antronoz,
Tremen a reas-hi 'vel ma tremen ar roz.

XI

An eostig a ganas e kichen ar feunteun :
« Gant an nevez-amzer eo e tremen ar bleun,

XII

« Me wel d'ar Baradoz o pignat gand ar skeul
« Eur vleunennig tener, hag he c'houez vat d'he heul. »

EOSTIG KERINEG.



Skeudenn garet

Kanaouenn a vro-Iwerzon (Irlande)
an drede eus ar pevarzek kanaouenn
gelliiek dastumet hag eil-tonet gant Bour-
gault-Ducoudray.

Andante espressivo

Oh! chom en deo d'in da c'hour-ni
jal' dieu-denn ga-ret'chom a-tao toot d'am c'halon ha d'am spe-
red, Na son-jin en dei-ziou Raer-ge
Tremenet siouaz na zis-kle-tien d'eur gazar-tez Ker
brag' vit an holl mato vi don-me te zo beo hag e
sonj d'in e-maouto vouz e'hoar-zin
chom en deo d'in da c'hour-ni-jal' skeudenn garet an en-
vor a-cha-nout am fe-aly br - pred

O! chom en-dro d'in da c'hounijal, skeudenn garet,
Chom atao tost d'am c'halon ha d'am spered,
Ma sonjin en deziou kaer-ze tremenet, siouaz,
Pa zisklaerien d'it eur garantez ker bras!

'Vid an holl maro, 'vidon-me te zo beo hag e sonj d'in
Emaout o vouse'hoarzin.
O chom en dro d'in da c'hournijal, skeudenn garet,
An envor ac'hanout am frealz bepred.

Nann, nann, gant e drouz ar bed d'am c'halon n'eo netra,
Tremeniad, e kerzan hep sellet outa;
Diseblant e lezan da dremen va derveziou,
Hep plijadur nemet gant va hunvreoù;

Va hunvreoù ker, diouanet en amzer ma oan troet
O! Jany, d'az karet.
Nann, nann, gant e drouz ar bed d'am c'halon n'eo netra
Rak gant va c'harantez e fell d'in beva.

PAOTR TRÉOURÉ.



Plijadur ha displijadur

Gwerz a vro-lwerzon troet e brezoneg

Andante

Tre ma strink an heol tom-
 - der war ar mor o trou- zal, an - dour
 doun a c'hell be-za cho- met yen ha ten-
 - val; Tre ma vez dremm an den O vouo-
 - c'hoar-zin la-ouen E galon a - li-
 - ed a vez leun a an - ken

Tre ma strink an heol tomder war ar mor o trouzal,
An dour doun a c'hell beza chomet yen ha tenval;
Tre ma vez dremm an den o vouse'hoarzin laouen,
E galon alies a vez leun a anken.

Plijadureziou gwirion ha poaniou didruez
A zigouez bep eil warnomp epad hon holl buhez;
Kalz a deu ne reont forz, p'o deus tanvet peb tra,
Nag eus a drubuilhou nag eus a wir joa!

Ar galon, p'he deus tanvet an trubuilhou garo,
'Jom evel ar skour sec'het dindan an heol bero;
Kaer en deus strinka 'n heol tomder ha sklerijenn,
Ar skour maro, siouaz, ne advleunio biken!

PAOTR TRÉOURÉ.

Paotr ha paotrez

Sên a Vro-Skes treet e brezoneg

all. moderato

Ma ti-gouez Yann, nig gant Jani war ri-blew ar ster
 Ha ma teu da bo-kat de-zi na la-va-ri-ger
 Pep plac'h ya-ouank deuz he mignon Nann e-me Jann Ivonn Gwir
 eo ar baotred o tre-men A c'hoarz ou-zin la-ouen

I

Ma tigouez Yannig gant Jani
 War riblou ar ster
 Ha ma teu da bokat dezi,
 Na lavarit ger.

DISKAN

Pep plac'h yaouank 'deus he mignon :
 — « Nann ! eme Jann Ivonn ;
 Gwir eo ar baotred o tremen
 A c'hoarz ouzin laouen ! »

II

Ma tigouez Yannig gant Jani
 'Barz er c'hêriou bras,
 Ha ma chom ganti da strani,
 Na youc'hit ket c'hoaz !

III

D'am mignon koant me 'zimezo
 A lavar Janned,
 'Met nag e vro nag e ano
 N'o lavarit ket.

PAOTR TRÉOURÉ.

Marivonig Keryell ⁽¹⁾

Quantité = 100

E Ker-yell'z eus eur pla-c'hig Mar-vo-nig va
 dou - sig E Ker-yell'z eus eur
 pla-c'hig, a gar va c'ha-lo - nig a
 gar va c'ha-lo - nig.

E Keryell 'z eus eur plac'hig
 A gar va c'halonig.

Kaer eo 'vel en heol pa bar
 En hanv war an douar.

Freskoc'h eo eged ar roz
 Glebiet gant ar gliz-noz.

He c'horf ker mistr ha ker moan
 Vel al lili 'zo glan.

Bihan ha skanv eo he zroad,
 Lemm ha glas he lagad.

He bleo 'zo hir ha melen,
 Hag he c'halon laouen.

He sell a zo birvidik,
 He c'han, hini 'n eostig.

(1) Ar zon-man eo hini Yvona Gerizel, savet gant F.-V. an Uhel, nemet eo krennet ha kempennet eun tammig, evit ma vezo gellet he c'hana war unan eus an toniou kaera dastumet gant an A.-M. Duhamel en e levr dispar *Kanaouennou Breiz-Izel*.

He diouchod a zo ruz-wenn
Henvel ouz diou rozenn.

He dent 'zo vel diou renkad
Oanigou gwenn 'n eur prad.

Gant he halan 'z eus c'houez vat
'Vel gant spern-gwenn ar c'hoad.

Braoat ma vez da welet,
Da zul en ofern-bred!

Koef dantelez war he fenn,
Kroaz aour en he c'herc'henn.

En holl barrezioù tro-dro
N'eus ket eun all er vro.

Ker koant, ker fur ha Monig,
Marvonig, va dousig.

Emaoun krog em ugent vloaz,
Soudard e vin warc'hoaz.

Oh! ra blijo gant Doue
Va diouall en arme.

Ma tizroin ker seder,
Ha m'oun breman d'ar gêr.

Ar Person hor badezas
Hor skoulmo neuze c'hoaz.

Dirag aoter hor parrez,
Dindan sell ar Werc'hez.

Hag e chomimp unanet
Keit ha ma vimp er bed.



Karantez da genta

$\text{♩} = 108$

Distumet gant H. GUILLERM.

Ja-ned a oa eur plac'hig koant leun a fur:
nez hag a ski - ant oh! dan-sons ma-di-
rek - te Jo - li gar-çon ma-di-ra don-
don

1

Janed a oa eur plac'hig koant,
Leun a furnez hag a skiant.
Oh! dansons, madirette,
Joli garçon, madira dondon

2

Rak se he doa meur a vignon
A glaske gounit he c'halon.

3

Ar c'henta, mab eur miliner,
Hanvet er vro Job al Lonker.

4

An eil, Per, eur boutaouer koad,
Ha n'en doa nemet tri zroatad.

5

An trede, Fanch ar mansoner,
Disto e benn ha friet berr.

6

Ar pevare, eur c'hrak-aotrou,
'N doa poan o tougen e vragou.

7

Ar pempet, eur martolod koz,
Eur reder merc'hed deiz ha noz.

8

Ar c'houec'hvet, Yann ar mesaer,
Godell c'houllo, kalon dener.

9

'C'hellit kredi, paotr an denved
A c'hounezas kalon Janed.

10

Merc'hedigou, kanit eta,
Klaskomp karantez da genta.

11

Gwell eo karantez 'leiz an dourn
Eged aour melen 'leiz ar fourn

12

Rag an aour melen 'vez rannet,
Hag ar garantez ne vez ket.



SOUBENN AL LAEZ

Ar zon-man a veze kanet gwechall, gand ar yaouankiz, da bardaez deiz an eured, endra ma sone ar binioù ea ti, Bourgoult Ducoudray en deus he renket en e levr « Mélodies populaires de Basse-Bretagne ».

Do, nit hu so,nerien so, nit ha
so, nit ge so, nit ha so, nit ge E ma'z zoubenn al
laez O vont war an tre-bez, e ma'z zoubenn al
laez O vont war an tre-bez a!
a! a!

1

Sonit-hu, sonerien, sonit munut ha ge,
Ema 'r zoubenn al laez, o vont war an trebe.

2

Sonit-hu, sonerien, sonit munut ha stank
Ema 'r zoubenn al laez, o vont war ar bank.

3

Sonit-hu, sonerien, sonit munut ha ge
Ema 'r zoubenn al laez o vont 'barz ar gwele

4

Kenta tamm anezi, kenta tamm anezi
Kenta tamm anezi, 'zo d'ar Werc'hez Vari.

5

An eil tamm anezi, an eil tamm anezi,
An eil tamm anezi, 'zo d'ho pried ha c'houi.

6

'N trede anezi 'zo d'ho tad ha d'ho mamm
Oc'h bet maget ganto 'n amzer ma oac'h yaouank.

7

P'vare tamm anezi 'zo d'ho preur ha d'ho c'hoar
Ha da gement-hini a zo d'eoc'h hiziv kar.

8

'R pempet tamm anezi a zo d'ar vignoned
Hoc'h eus darempredet betek deiz hoc'h eured.



An durzunell

Ar zon-man a zo bet kanet ha diskanet gwechall e kement pardon, foar ha mare'had a oa e Breiz-Izel: an ton a zo aes da zeski ha kaer kenan.

Kalz am-zer am-eus Kol-let, ti ra
 di lan ti ra da la la la la Kalz
 am-zer am-eus Kol-let o fur-chal ar c'hoar
 jou, o fur-chal ar c'hoar-jou

Kalz amzer am eus kollet
O furchal ar c'hoajou
'Vit sourpren an durzunell
Kousket war ar brankou.
Skoaziet em eus va fusul
Met tennet em eus fall,
Tec'het eo an durzunell,
Ha nijet er c'hoad all.

Diouz an noz hag ar mintin
'Klevan al laboused
O kana, o fredoni,
Da veg ar gwez pigret
Ha n'eus nikun anezo
A bikfe va c'halon
Evel mouez an durzunell
O ouela d'he mignon.

Hirvoudi ra noz ha dez
Gand ar boan, an anken,
'Vel eur paour kaez intanves
Kollet ganti he den.

Hekleo he mouez klemmus
 A red dre ar c'hoajou,
 A zo meurbed poanius
 D'an holl labousedou.

— Petra, turzunell yaouank,
 A dourmant da galon?
 — Kollet em eus, emezi,
 Va fidela mignoun !
 Ma na deu ar chaseour
 D'ober d'in-me mervel
 Me varvo gand ar glac'har
 D'am mignon koant fidel.

N'eus na louzou, na souten,
 Na frealzidigez
 Gouest da barea souden
 Gouli va c'harantez.
 Trec'het oun gand ar glac'har;
 Mont a ran da vervel,
 Met ne varvin ket kountant
 Ma ne varvan fidel. »

Gwelet em eus o vervel
 An durzunell yaouank
 Disec'het piz he c'halon
 Gand ar boan, an tourmant.
 En he huanad diweza
 He deus c'hoaz lavaret:
 « Kenavo, mignon fidel ! »
 Raktal eo tremenet !

Melezour sklaer ha gwirion
 Eus ar wir garantez,
 Ha ne gaver e kalon
 Ar yaouankiz direiz.
 — Nann, nann: ne varvin laouen
 Ma ne varvan fidel.
 Ha biken ne zizonjin
 Maro an durzunell.

Dastumet gant PAOTR TRÉOURÉ.



Va merc'h Janned, mar timezit...

Shone.

Va merc'h Jan-ned mar ti-me-zit
 Va merc'h Jan-ned, mar ti-me-zit Klaskit eur gwall-
 zen mar ki-rit la-ti-rou lan-li la-ti-rou lan-la
 la-ti-rou lan-li lan-li o la-ti-ra

I

Va merc'h Janned, mar timezit,
 Klaskit eur gwall-zen, mar kirit.

II

Evidoun-me 'm eus bet unan
 Leiz va c'halon 'm eus anezan.

III

Pa 'z oun aet d'her c'has da gousket
 'M eus her c'holllet el ludueg.

IV

Me 'm eus kemeret ar bal-dan
 Da glask dillo va den bihan.

V

P'em eus e laket er gwele,
 Er plouz her c'hollis adarre.

VI

Ha me ha mont da glask eur fore'h
 Da deurel ar plouz er c'hraou moc'h.

VII

Pa oan o vont war an treujou
'M eus diaozet e gosteziou.

VIII

Me 'm eus kroget e penn e fri
Hag hen taolet 'n tu all d'an ti.

IX

Ha deut ar big en eur gana
Da gonta e pe stad e oa.

X

Edo 'r golvan ouz her chokat,
Ar penn-glaou ouz her pigosat.

XI

Me yeas da glask eur vaz kelvez
Da skei war an evned gouez.

XII

Tapet va den em zavancher,
Me deuas prim gantan d'ar ger.

XIII

Eur votez 'm eus karget a foenn
Ha laket enni va zamm den...

XIV

Laket ar votez 'korn an tan
Aze vo kaer d'am den bihan.

XV

An tan en deus kroget er foenn
Hag e rostet raz troad ha penn.

XVI

'M eus hen paket war an oaled
Va zargaz en deus hen debret.

XVII

Breman setu me intanvez
Prest adarre d'ober al lez!

BLEIZ KAMORZ, *Dihunamb.*

TINA GOANT

(*Merc'h ar Miliner*)

Ton dastumet e Lanngedik gant L. HERRIEU.

Mi-li-ner mi li-ner Ker c'hoant Mi-li-ner mi li-
ner Ker c'hoant Mi-li-ner mi li-ner Ker c'hoant
Anaout a rit e Di-na goant Anaout a rit
e Di-na goant

1

Miliner, miliner, Kerc'hoant
Anaout a rit e Dina goant ?

2

E verc'h ker fichet d'ar zuliou,
A zans ker skanv er pardonioù.

8

Setu ar plac'hig dimezet;
Piou a zonz d'oc'h he deus-hi bet ?

4

Neb he c'harie 'vel e lagad,
Laouik eus a vilin Rozmad ?

5

Nann ! bet he deus eur genaoueg,
Pinvidik, a gomz ar galleg.

6

Ha setu rannet gant glac'har,
Kalon ar miliner her c'har.

7

Laouik a zo karantezus,
Eur poanier mat, eun den nerzus ;

3

Met egile en deus arc'hant :
Setu 'n werzet Tina goant !

9

Laouik ' gomze a garantez
Egile gomze a zanvez :

10

Gant dilhad kaer, arc'hant hag aour
E c'hounezas ar plac'hig paour.

11

Va malloz rus war ar madou,
A dro pennou ar merc'hedou.

12

Gwell eo karantez leiz an dourn
Eged aour melen leiz ar fourn.

F. V. AN UHEL.

Bepred Breizad.



Ha penaos ober krampoez ?

Ton ar zon-man a zo bet dastumet, e Landudal, e Kerne,
gand an A. F. M.; ar c'homzou a zo bet dastumet, e Ka-
morz, evit Dihunamb, gand an Dimezell E. L.

Bourgault Ducoudray a renkas ivez ar zon-man en e
levr: *Mémoires populaires de Basse-Bretagne*.

Allegro vivo 3/4 = ♩

Ker kent ha m' oan di-mezet Al. lon. la. di. ge.
 . da Al. lon. la Al. lon. la. di. ge don Al. lon.
 - la Ker kent ha m' oan di-mezet en eur stad trist
 voen la. ket Ho. mer En eur stad trist voen la.
 - ket

Kerkent ha m' oan dimezet,
En eur stad trist ' voen laket.

Laket ' voen e gwall enkrez,
N'em boa scurt em ziegez.

Paour glez ' oan p'e gwir n'em boa
Em zi, na skudell, na loa!

N'em boa na taol, na listri,
Na tamm ganto da zebri.

Ha penaos ober krampoez,
P'edo va dour er Blanvoez?

Da glask dour e voen kaset,
Gand eur podig pri torret;

Gand eur podig pri torret
Hag eur c'hoz sailh didalet

Va rozell ha va spanell
A oa c'hoaz er c'hoad a-bell.

Va bleud 'oa e Gemene,
Ha va c'hoad e Kemperle.

Ha pa laken kig er pod,
Em boa eun askorn d'am lod;

Me 'n em gave, c'hoaz, ervat
O chom en ti d'her c'hignat.

Rak alies, 'vel ar c'hi,
E ven skarzet eus an ti!

Pa 'z een da frita viou
'N deveze dek ha me daou!

Setu, tudou, ar vuhez
A renan em ziegez.



TREDE KEVRENN

Sonjioù evit bugale

VA LABOUSIG GWENN

Ton savet gant A. BOUCHER

Komzou GI. MÉVEL.

The musical score is written on four staves in a 2/4 time signature with a key signature of one flat (B-flat). The melody is simple and consists of quarter and eighth notes. The lyrics are written in a cursive hand below the notes.

Me am eus pa- ket eul la bou sig
gwenn, Eul la- bou- sig gwenn, A gren
e vru- ched e- vel eun de- len O ka
na d'in me e vrao- a ka- naou- enn.

1

Me am eus paket eul labousig gwenn
Eul labousig gwenn
A gren e vruched evel eun delenn
O kana d'in me e vraoa kanaouenn.

2

Va lez da nijal a lavare d'in
A lavare d'in
Me gano kaeroc'h va soniou lirzin
Eus an noz bemdez hag ive bep mintin.

3

'Vid o digeri me 'm eus diouaskell
Me 'm eus diouaskell
Red e ven lezet, en nenv, da zével
Anez e varvin ha ne vezo ket pell.

4

Kerz en aer eta, va labousig gwenn,
Va labousig gwenn
Nij atao seder, kan bepred laouen
Me 'm bo keuz atao d'it, va labousig gwenn.

Va e'hi ha va e'haz

Komzou GL. MÉVEL.

Ton savet gant A. BOUCHER.

Me'm eus eur c'hi hag eur c'ha - zig
 brao, Hag eur c'ha-zig brao, U. nan'
 fich e lost, eun all a lip e bao Me'm eus
 eur c'hi hag eur c'ha-zig brao.

1

Me 'm eus eur c'hi hag eur c'hazig brao
 Hag eur c'hazig brao
 Unan 'fich e lost, eun all a lip e bao
 Me 'm eus eur c'hi hag eur c'hazig brao

2

Me 'm eus eur c'hi hag eur c'hazig flour
 Hag eur c'hazig flour
 Unan a ev laez, eun all n'ev nemet dour
 Me 'm eus eur c'hi hag eur c'hazig flour

3

Me 'm eus eur c'hi hag eur c'hazig dous
 Hag eur c'hazig dous
 Unan a zo fur, egile a ra trouz
 Me 'm eus eur c'hi hag eur c'hazig dous

4

Me 'm eus eur c'hi hag eur c'hazig mat
 Hag eur c'hazig mat
 Joa va c'halon ha joa va daoulagad
 Me 'm eus eur c'hi hag eur c'hazig mat

KOTOGOTOGOG

Eur zen-e'hoariell hag a vez kanet e Plougin
 ha tre-var-dre d'an eureujou

I

Allegretto

Eur c'haner, hebken.

Adkanet gant an holl.

Di. dul me vô pin - vi. dik Di. dul me vô pin.
 - vi. dik Pa'm hô pre-net eur ya - zig Pa'm
 bo pre-net eur ya - zig Giag giag giag e
 me va yar koto go to gog e. me'v c'hil. log.

War don ar c'houblad kenta.

II

Disul me vô pinvidik, disul me vô pinvidik,
 Pa'm hô prenet eur c'hiig, pa'm hô prenet eur c'hiig.

Eur c'haner.

Adkanet gant an holl.

Aou, aou, aou, e. me va c'hi giag giag giag e.
 me va yar koto go to gog e. me'v c'hil. log.

III (1)

Disul, me vo pinvidik,
P'am bo prenet eur c'hazig.
Bismignaon, eme va c'haz,
Aou, sou, eme va c'hi etc.

IV

Disul, me vo pinvidik,
P'am bo prenet eur marc'hig.
Ouin, c'hin, c'hin, eme va marc'h,
Bismignaon, eme va c'haz, etc.

V

Disul, me vo pinvidik,
P'am bo prenet eur vioc'hig.
Man, man, man, eme va bioc'h,
Ouin, c'hin, c'hin, eme va marc'h, etc.

VI

Disul, me vo pinvidik,
P'am bo prenet eur maoutig.
Bê, bê, bê, eme va maout
Man, man, man, eme va bioc'h, etc.

VII


Disul, me vo pinvidik,
P'am bo prenet eun doc'hig.
Oc'h, oc'h, oc'h, eme va doc'h,
Bê, bê, bê, eme va maout, etc.

(1) Ar c'houblad-man hag ar re a deu d'e heul a vò kanet er memez doare gant an daou genta. Ne vò ket diezamant nemed gant an trede poz eus peb hini azezo, rag neuze ar mestr-kaner, hag an holl war e lerc'h, a ran-ko henvel eul loan muioc'h bep taol, en eur vont var ar c'hiz: eno eme ar c'hoari; eno e vò an abadenn, ha ~~kelz~~ a vò laket nec'het araok ma vò ar mare da gana: Kotogotogog, eme 'r c'hilhog.

VIII

Disul, me vo pinvidik,
P'am bo prenet eur wregig.
Hi, hi, hi, eme va gwreg,
Oc'h, oc'h, oc'h, eme va doc'h,
Bê, bê, bê, eme va maout,
Man, man, man, eme va bioc'h,
Ouin, c'hin, c'hin, eme va marc'h,
Bismignaon, eme va c'haz,
Aou, aou, aou, eme va c'hi,
Grag, grag, grag, eme va yar,
Kotogotogog, eme 'r c'hilhog !

Dastumet gant PAOTR TRÉOURÉ.



Yannig an difouper neiziou

Eur s6n goz evid ar vugale, anavezet, e Leon, Kerne ha Treger

Allegretto

Ka vet' neuz da zaout 'ta Yan-nig

Ka-ve't' neuz da zaout 'ta? Ne'm eus ket

ne'm eus ket Gwel-loe'h 'geto' m eus ka vet.

Ne m eus ket ne m eus ket Gwel-loe'h ge to

m eus ka vet

1

Kavet' peus da zaout 'ta Yannig,
 Kavet' peus da zaout 'ta ?
 — Ne 'm eus ket, ne 'm eus ket, { bis
 Gwelloc'h geto 'm eus kavet.

2

Petra' peus kavet 'ta, Yannig,
 Petra' peus kavet 'ta, ?
 — Eun neiz pig, eun neiz bran, { bis
 Hag eun neizig laouenan.

3

Pe seurt viou 'z' enno 'ta, Yannig,
 Pe seurt viou 'z' enno 'ta, ?
 — Unan ruz, unan gwenn, { bis
 Unan glas, unan melen.

4

Digas d'in unan 'ta, Yannig,
 Digas d'in unan 'ta ?
 — Ne roin ket, ne roin ket, { bis
 Ar re-ze 'zo 'vit ma gwreg.

5

Pe seurt gwreg az peus 'ta, Yannig,
 Pe seurt gwreg az peus 'ta ?
 — Unan vihan, unan deo, { bis
 Hag a zao e mare vrao.

6

Da bet eur e sao 'ta, Yannig,
 Da bet eur e sao 'ta ?
 — Etre dek eur ha kreizteiz { bis
 'Sao ar big diwar he neiz.

7

Pe seurt soubenn 'ra 'ta, Yannig,
 Pe seurt soubenn 'ra 'ta ?
 Soubenn pesk, soubenn fresk, { bis
 Soubenn vijil alies.

PAOTR TREOURE.



Kaourintinig ha Marivonig

Ar zon-man troet diwar brezoneg Gwened a vez kanet wardro Pontivy gand ar vugale. Bez ez eo eur zon gaer diouz doare beza kanet gand eur paotr hag eur baotrez vihan eus an hevelep oad.

P. TR.

Lento

P'lec'h zai ar zaout varc'hoaz Marivonig P'lec'h
zai ar zaout varc'hoaz Da bark ar Reier
glas Koranlinik Da bark ar Reier glas O!
Kasit i, ha deuit en dro Ha ni a c'hoari -
o Marivonig Ha ni a c'hoari - o

I

KAOURANTINIG. — P'lec'h 'z ay ar zaout warc'hoaz, Mari-
[vonig,
P'lec'h z' ay ar zaout warc'hoaz?

MARIVONIG — Da bark ar Reier glas, Kaourintinig,
Da bark ar Reier glas.

KAOURINTINIG — O! kasit i ha deuit endro,
Ha ni a c'hoario, Marivonig.

O DAOU — Ha ni a c'hoario.

II

KAOURINTINIG — Pe seurt c'hoari a vo? Marivonig,
Pe seurt c'hoari a vo?

MARIVONIG — C'hoari boulou dero... Kaourintinig,
C'hoari boulou dero...

KAOURINTINIG — C'hoari boulou ha meinigou,
War letoun ar prajou, Marivonig.

O DAOU — War letoun ar prajou.

III

KAOURINTINIG — An h'ni a gollo, Marivonig,
A' h'ni a gollo.

MARIVONIG — Daou aval a baeo, Kaourintinig,
Daou aval a baeo.

KAOURINTINIG — Ha d'ar park bras e ray an dro,
D'ar red ken na gouezo, Marivonig.

O DAOU — D'ar red ken na gouezo.

PAOTR TREOURE.



DANS-TRO

Eur zôn goz diouz doare kana epad an dansou breizek; het kanet e Kastell-Paol da c'houel ar Bleun-Brug.

Allegro ♩ = 120

Naon tek gwenneg ha pevar
 Zroad a zo re bounner Naon bounner
 Ne zin mui d'ar c'hoak Kar re bounner
 Kar re bounner Ne zin mui d'ar c'hoak
 Kar re bounner eo va zroad.

Naontek gwenneg ha pevar,
Va zroad a zo re bounner (bis).

Ne din mui d'ar c'hoad,
Kar re bounner, kar re bounner,
Ne din mui d'ar c'hoad
Kar re bounner eo va zroad...

Triouec'h gwenneg ha pevar, etc, etc.
Seitek gwenneg ha pevar...
C'houezeg gwenneg ha pevar...
Pemzek gwenneg ha pevar...



Ar paotr glac'haret

Tad trop vite ♩ = 116 or vision

Pa oan em c'havell, bi-ha-nik, trei
 ta la la la la la la la la Pa oan em c'havell
 bi-ha-nik Me'moa choazet eur ves-tre-zig

- 1
Pa oan em c'havell bihanik
Trei ta la la la la la la la,
Pa oan em c'havell bihanik
Me'm oa choazet eur vestrezig.
- 2
Me'm oa choazet eur vestrez koant
Heb ober d'ei he c'homplimant.
- 3
Hounnez a zave beure mat
Evit lakaat he c'houef ervat.
- 4
Petra dalv d'in-me beza koant
Pa ne c'hellan ket kaout va c'hoant.



AR MESAER BIHAN

Di_sul vin_tin vel ma sa
 ven O Di_sul vin_tin vel ma sa
 ven eur vouez dous a gle_ven e lon
 la! eur vouez dous a gle_ven o!

1

Disul vintin, 'vel ma saven, o!
 Disul vintin, 'vel ma saven,
 Eur vouez dous a gleven, e lon la!
 Eur vouez dous a gleven, o!

2

Eur vouez a gleven o kana,
 e lez ar c'hoad tosta.

3

Eur vouez bravoc'h ne c'heller ket,
 klevet e bro ebet.

4

Vit kana gwelloc'h ne deus ket
 Met an eostig er bed.

5

Ha dre al lann pa dremenen,
 Bleuniou a gutuilhen.

6

Ha war bleg va brec'h o c'hasen,
 d'an hini a gleven.

7

Ouz ar c'hoad dre ma tostaen,
 he c'hlevet gwel a raen.

8

Met, allas, he c'hlevet a raen,
 hep kompren he sonenn.

9

Eur zonnenn deut eus a Vro-C'hall,
 gant eun trouc'her-segal.

10

Kerkent va bleuniou ruz ha glas,
 eus va dourn a gouezas,

11

rak n'am oa ket o c'hutuilhet,
 'Vid eur verc'h ken desket.

J. LE BAYON.



Ar mab :-

SAVET E BRO-WENED.

Moderato

Gwech-all va mamm ga- ret Me'm eus bet
pli- ja- dur Pa ve- zen luskel- let c'houi a ga-
- ne d'ho krou- a- dur Gwech-all va mamm ga-
- ret Me'm eus bet pli- ja- dur

Gwech-all, va mamm garet,
Me 'm eus bet plijadur,
Pa vezen luskellet
C'houi a gane d'ho krouadur,
Gwech-all, va mamm garet,
Me 'm eus bet plijadur.

Da vintin pa zaven
Me 'm eus bet plijadur
Pa laren va fedenn
C'houi ' bede gant ho krouadur,
Da vintin pa zaven
Me 'm eus bet plijadur.

Epad va holl buhez
'Vit m'em bo plijadur
C'houi 'gano d'in bemdez:
Kanit, kanit d'ho krouadur,
Epad va holl buhez
'Vit m'em bo plijadur.

PEDERVET KEVRENN

Rimadellou koant
ha divizou fentus

AR C'HI EN DIENN

Allegro. Métr. ♩ = 120.

Di-sul o tont eus an o-fren, Di-sul o-
tont eus an o f'ren Sailh ar c'hi du lan di-gue-
-don Er pod di-enn lan-li-ron

Disul o tont eus an of'renn (2 wech)
Sailh ar c'hi du, *landigedon*,
Er pod dienn, *lanliron*.

Arru ar mestr e kreiz an ti,
Hag e c'oulenn, *landigedon*,
P'lec'h man e gi, *lanliron*.

Ar mestr a lar d'ar vesaerez :
— Krog en o lost, *landigedon*,
Tenn hen er mêz, *lanliron*.

Krog en e lost ha lip e benn,
Rak... pec'hed eo, *landigedon*,
Koll an dienn, *lanliron*.

— Tavit, ar mestr, na ouelit ket
Chas du a-walc'h, *landigedon*,
A vo kavet, *lanliron*.

Chas du a-walc'h a vo kavet,
Met ken desket, *landigedon*,
Ne vezo ket, *lanliron*.

Dastumet gand an A. H. GUILLERM.



SON AR C'HAFE

A musical score for the song 'SON AR C'HAFE'. It consists of six staves of music in G major and 2/4 time. The lyrics are written below the notes.

A Gas-tell Paol da Lan-nu-on A Ger-ne da
 Oue-lou Ez eus bet da vet meur a zon
 Di-war an e - va-chou E - vi-don Keit ha
 ma ve-vin Me gav d'in e la rin Ne-tra ne
 blij d'in-me 'Vel eur ban-ne ka-fe Ne-tra ne
 blij d'in-me 'Vel eur ban-ne ka-fe!

I

A Gastell-Paol da Lannuon,
 A Gerne da Ouelou,
 Ez eus bet, savet meur a zon
 Diwar an evachou;
 Evidon keit ha ma vevin,
 Me gav d'in e larin;
 Netra ne blij d'in-me,
 'Vel eur banne kafe!

DISKAN

Netra ne blij d'in-me
 'Vel eur banne kafe.

II

Eur vamm pa glev he bugel kaez
 O ouela 'n e gavell,
 Gand eur banne kafe gant laez
 A ra d'ezan tevel.
 Ha neuze diou vouezig vihan
 A unan a vouskan.

III

Ha pa 'z eas Fanch ar paotr faro
 Da welout Jannig vrao,
 E laras d'ez: « Du-man 'zo
 Chistr ha gwin leun ar c'haol »
 Met Jann a respontas a-benn
 D'ar c'haez den he sonnenn:

IV

En tiegeziou pinvidik,
 Ema bet a viskoaz,
 Ar c'hiz da ginnig kafe rik,
 Warlerc'h ar predou bras;
 Aotronez hag intronezed
 A glevet o laret:

V

Ar paour ivez, mesk al ludu,
 En eur pod pri faoutet,
 A domm eur banne kafe du
 Araok mont da gousket:
 Hag hep sonjal 'n e baourente,
 'N e wele ec'h hunvre:

VI

Kenta labour ar martolod
 Kerkent m'eo dihunet,
 Eo redek da zifenn e lod
 Eus an dour du karet,
 Hag eur wech leinet mat, d'e dro,
 e laro, hep distro:

VII

Ar c'hafe 'zo eul louzaouenn,
 Hep par dreist pep hini;
 Ha n'hellan ket en eur zonenn,
 Kaer a-walc'h he meuli;
 Va son a vefe kalz re hir,
 Pa 'z eo gwir, en eur gir:

VIII

Me a varvo ivez m'oarvat,
 Evel pep krouadur,
 Ha m'ho peus c'hoant neuze, tud vat,
 D'ober d'in plijadur,
 C'houi 'verko war va bez dister,
 Doun ha sklaer, en eiz ger:

DISKAN DIWEZA

Ma z eo eur paotr an hini a gan:
 Netra d'ezan n' blijje
 'Vel eur banne kafe
Ha ma 'z eo eur verc'h an hini a gan:
 Netra d'ezi n' blijje
 'Vel eur banne kafe.

Evnig Penn-ar-C'hoad.



AR GOULENN-EURED

Diviz etre ar jubenn hag an tad

Andantino

Deiz mat d'eoc'h holl tud an ti - man kiel
 laouen ho ka - van Ker brao gwisket pep feson.
 - don Ma la - var d'in stok va c'halon a hel lin bi -
 - ken tre - men ho ti hep dont d'ho salu - di

AR JUBENN

Deiz mat d'eoc'h holl, tud an ti-man,
 Kel laouen ho kavan,
 Ker brao gwisket, e pep feson,
 Ma lavar d'in stok va c'halon,
 N'hellan biken tremen ho ti,
 Hep dont d'ho saludi.

AN TAD

Ni a zoug ar memez salud,
 D'eoc'h c'houi koulz ha d'ho tud,
 An onestiz eus ho komzou,
 Ar bervig dous eus ho sellou,
 A lavar d'emp, skler hag anat,
 • Ho peus eur c'helou mat.

AR JUBENN

Ni 'zo warlerc'h eur goulmig wenn,
 Gwall dizet gand eun tenn,
 He askell gleiz a zo torret,
 Nijal mui pell ne oufe ket
 Hag e klevis ez eo ama
 Ema deut da goueza.

AN TAD

Mar deo koulmed eo a glaskit
Kit d'ar maner davit;
Amañ, war ar maez, ganeomp-ni,
N'eus nemet piked ha brini,
Hogen eur gaou a livirit,
: eun dra all a glaskit.

AR JUBENN

Ni zo o klask louzeier fin
Da lakat 'n hor jardin,
Eun louzaouenn mat ouz ar bles,
Graet gant birou ar garantez,
Hag e klevis dec'h diweza
Her c'havjen er gêr-ma.

AN TAD

Ar flourdelizenn a glaskit
Siouaz! d'eomp aet eo kuit;
Ema breman e Kemperlé,
Er gouent o veuli Doue,
Koantoc'h eged eur bodig roz
E liorz ar baradoz.

AR JUBENN

Nann, va mignon, n'ho kredan ket,
Doue en devez graet
Evid ar vered an ivin
Evid al liorz al louzou fin
Hag Annaïg da laouenaat
Kalon eur pried mat.

AN TAD

Evel an dour, war ar prajou,
E tired ho komzou.
Treuzi a reont dor an ti-ma,
Evel ar mel eun tamm bara;
Da beurober ho kefridi,
Den yaouank deut en ti.

An tad a ra tro an ti hag a ginnig d'ar jubenn e wreg, unan eus e verc'hed dimezet, eur c'hrouadur bihan ganti war bleg he brec'h, eur verc'hig ha n'ema ket c'hoaz en oad da zimezi hag erfin ar plac'h nevez.

AN TAD

Gortozit 'ta eun nebeudig
Ma rin eur baleig,
Da c'houzout hag ez eus en ti
Eur plac'h bennak da zimezi.
Setu unan a **ziaze**,
Mar deo diouz ho toare.

AR JUBENN

Ouz ar wreg fur-ze pa zellan,
Heb aoun e lavaran
He devez graet mat he labour
Maget ke zud, gwisket ar paour,
Met ar pezh he deus graet pell 'zo,
Eun allig her graio.

AN TAD

Setu ama unan ker gae
Hag an heol da viz mae,
He diou chot 'zo diou gerezenn,
He daoulagad, diou steredenn
Hag a zo da ziouall outo
Hounnez eo sur ho po.

AR JUBENN

Ya! va mignon, an dremm lemm-se
Eo dremm ar garante,
Met me gred eo dija poazet
Diouz an darbod he bizied
Ha mar d'eo ker ruz he chot klei
Eun all 'n deus poket d'ei.

AN TAD

Nag an aelig-ma da Zoue,
 Hag ho koulm e vefe?
 Plac'hig vihan savit ho penn
 Da zellet ouz ar gristenien
 Ho lagad glas, ho pleo melen,
 Ne raint ket droug da zen.

AR JUBENN

Gand an heol tomm hag an amzer
 Eo ec'h aog ar mesper,
 Bloaz 'zo an hini a glaskan
 A oa glas-dour evel houman,
 Met hizio 'tistag diouz ar brank,
 War zin eun den yaouank.

AN TAD

Va mignon, n'eus den evidoc'h,
 Rak-se greomp ar peoc'h...
 Setu ar plac'h a c'houlennit,
 Hogen, den yaouank, diouallit
 Na ve morse kerse ganti
 Beza kuitaet he zi.

Yann Wilhou HERRY.



LAOU AR BRABANSER

farwellerez en eun arvest

Gwe-chall pa-oan paotr yaouank, er
 ger e ti va zad, er ger e ti va zad e
 voen, ka-dek dar skolach don de
 no vik be-za deo-tek mah don do

I

Gwechall pa oan paotr yaouank, er ger, e ti va zad,
 er ger e ti va zad,
 e voen kaset d'ar skolach,
 dondeno,
 'vit beza desket mat,
 dondo!

II

Eur wech kaset d'ar skolach, ne raen nemet c'hoari,
 Ne raen nemet c'hoari,
 Va brasa mall oa gellout,
 dondeno,
 ober lez da Vari,
 dondo!

III

Abae m'oun dimezet, e lec'h tremen diouti,
 e lec'h tremen diouti,
 E choman re alies,
 dondeno,
 da stleja mesk ar pri,
 dondo!

IV

Me 'gar va gwreg koulskoude, daoust ma n'eo ket re
 Daoust ma n'eo ket re fin, [fin,
 Met eun tamm oun re droet.
 dondeno,
 Ouz ar chistr hag ar gwin,
 dondo!

Hizio, pa 'm eus bet eur banne,
 Ouz n'eus fors piou me 'n em gannfe,
 Den gouest oun, ya! ya! eur gwaz oun,
 Ha tro-war-dro, n'eus ket 'veldoun;
 Da dri ozac'h e rofen lamm
 Ha c'hoaz ne c'houesfen ket eun tamm;
 Da dri ozac'h e rofen bec'h
 D'ezo o zri e vefen trec'h;
 O zaouarc'henna a rafen
 Ha re all ganto ma kavfen;
 Aze 'z eus divrec'h a dalv dir,
 Krabanou ha bizied hir;
 Aze sellit ez eus daouarn,
 Krenv da gamma eur vaz houarn,
 Ha meudou hag arabad eo,
 Beza re voustret etrezo.

En deiz all en ostaleri
 e oamp eun nebeud o tebri;
 Nan ar C'hleger ha Per Drebaol
 A oa ganen bodet ouz taol;
 A-greiz-holl, Per a lavaras,
 — ouzin, m'oarvat, o klask trabas. —
 e oan eur mezhvier aet dreist kont,
 hag e oan bet gvelet o vont
 Betek dishouarna kezeg,
 Da gaout digarez da redek
 : « Biskoaz, avat, 'm oun-me, biskoaz,
 « N'oun bet kouezet en toull-ze c'hoaz! »
 Ha me gant va c'hounnar kregi
 En e zilhad hag o regi,
 Hag hen, mar gouie, tapout krog,
 en eur voutailhad gwin Medog
 A venne stlepel war va bleo,
 : « Hola! Moun-me arabad eo
 « Koll traou ker mat all war va fenn;

« N'eo ket gant gwin e walc'her kenn,
 « Rak-se. Nan ha Per, evomp hi,
 « D'hor yec'hed, etrezomp hon tri! »
 Mat 'm oa komzet ha peb a lomm
 Hol lakas hon tri, en hor plomm,
 Ha goude ez ejomp en hent,
 ha ni, mignonned, evelkent!

(aman e kouez e dog diwar e benn).

Sell! heman, breman, o koueza;
 Mat, chom, aze, da loueda,
 Rak, d'an douar, ma soublan re,
 e c'hellfen pokat, marteze,
 Ha te ne vo ket dare d'it,
 Ma kouezan, sevel d'am c'has kuit;
 Rak-se 'ta, chom, pa 'z out kouezet
 Hepdout, brao bras, me c'hell kerzet.

(Aman, unan bennak a zrevezo kan ar c'hilhog.)

Kleo! kilhog Janig ar Pennker,
 E rin e stal outan emberr,
 Pa vezo Janig hag he zud,
 Hag he yer kousket en o glud;
 Den ebet ne gavo al laer:
 Laerez eur penn-yar! eur pezh kaer!

(Eur voutailh a zo gantan en e c'hodell hag ec'h ev eur banne hag e kev ar spontailh o wigourat.)

Petra, unan bennak a venn
 E torfenn houman war e benn?
 N'en deus nemet tostaat aman
 Hag e rin bruzun anezan;
 N'en deus nemet tostaat raktal
 Hag e rin brao d'ezan e stal.
 A! Me n'eo ket eur c'hrener oun;
 N'em eus aoun nemet da gaout aoun;
 bet oun bet pemp bloaz er brezel
 Hep beza kollet eun ezel
 Gwir eo pa zute an tennou
 e ouien klask va difennou.
 Kaer 'zo tec'het a-raok ar boan,
 Ar bleiz en em gav gand an oan.

'Vidoun-me zo deut brao d'ar gêr
Hep ma ve bet re domm d'am ler;
E kenver en em ziousall mat,
em eus espernet mab e dad
Ha daoust m'oun bet doun el lagenn
'M eus chachet va skasou ganen.

(Aman e c'hellfe eva eur banne adarre.)

Gwechall pa oan e ti va zad,
Ne oa paotr all ebet em oad
Ker koant ha me hag ar merc'hed
A vousc'hoarze ouz va gwelet
Ar gened 'zo warlerc'h ar mad
Keit ha ki kamm warlerc'h ar c'had,
Met hep kened ne c'heller ket
Plijout da galz a dud ar bed.
Ma ne vijen ket bet paotr brao,
' Oan chomet dizemez atao,
Rak Mari Wenn, va gwregig paour,
Ne zelle tamm 'bet ouz an aour;
A-walc'h he devoa evit daou,
Setu perak e karas Laou;
Abaoe ma 'z omp dimezet,
Meur a gant kwech he deus gouelet
Rak n'eo ket holl gant koanteri
E laker ar pod da vervi.

Ha ma 'z afen etrezek koan
Rak a hent all e rin kof moan,
Ha neuze mall eo d'in gwelet
Petra ra, er gêr, ar merc'hed:
Pa domm ar c'haz e gein er maez,
Logod an ti a c'hoari aes!

*(A-greiz-holl e teu, en e spered, en deus klevet kil-
hog ar Pennker o kana.)*

A-raok dizrei e rankan c'hoaz
Tapout kilhog ar Pennker bras
A gleven o kana raktal;
Dâ eo ober outan e stal.

*Neuze dres, pa zizro, e wel eur spontailh, tok
houarn merglet ar brezel bras war e benn, eur vantell
c'hlas dishevelebet en dro d'e gorf, eur c'hoz bragez
ruz, war e zivesker, hag eur fuzul en e zourn.*

(outan e-unan.)

Chesus! na pebez gweladenn!
Bez em bezo eur fallaenn.

(D'ar spontailh.)

Piou zo dirazoun, evelse?
Aoun am eus ouzoc'h betek re.
Siouaz! Na me 'zo panezenn,
Eus an hevelep kostezenn,
Ez omp hon daou, hep mar ebet
Aes eo 'ta d'eomp en em glevet.
Me n'oun ket falloc'h 'ged eun all,
Ha gall oun ganeoc'h ma 'z oc'h gall.
Ma 'z oc'h breizad ez oun breizad
H keriad oun ma 'z oc'h keriad.
Diouz an daou du me oar trei brao,
Ha diouz an holl tremen atao;
Banne d'heman, banne d'hen-hont
An arc'hant a zo graet da vont
Eus eur penn d'egile d'ar bed,
Eus eur c'hodell d'eben d'ar red,
Mat oun da baea banneou,
D'an holl, a gleiz hag a-zehou,
Me 'zo brokus hag an dud piz
N'o gouzanvan ket e nep giz,
Hag en hent-se, Laou, mab e dad,
Gand an holl a zo deuet mat.

(Outan e-unan.)

Eus a belec'h, da vihanan,
Eo kouezet hennez, dre aman?

(D'ar spontailh.)

Kemerit truez, me ho ped,
Ouz unan ha ne garfe ket,
Ober da zen 'n distera droug.
En aoun da bignat ouz ar groug.

Sellet a ra pisoc'h ouz dilhad ar spontailh hag e lavar outan e-unan.)

Me 'zo eun den kollet a-grenn,
Tri liou en deus; eur gall n'eo ken,
Hag e lavaren 'oan breizad;
Kollet oun ha kollet ervat.

(D'ar spontailh.)

Da belec'h ho peus c'hoant d'am c'has ?
N'em eus ket an distera kas,
Nag ouzoc'h, nag ouz gall ebet;
Va lezit eta da redek ;
A-du ganeoc'h e vin atao,
Ha meuli 'rin ho kalleg brao,
Prest 'vin er brezel hag er peoc'h,
Atao da vale evidoc'h.
Me n'oun ket tamm 'bet den a freuz
Ha ne garan ket gwelet reuz.
Ma fell d'eoc'h e vefen maro,
Skoit ganen eun taol garo.
A-raok avat, en hanv Doue,
Va Zalver Jezuz, hor Roue,
Va lezit da c'houlenn pardon,
A c'henou koulz hag a galon,
Eus va fec'hejou tremenet
En aoun na vefen iferniet.
Graet em oa le da vont ware'hoaz,
Diskabell kaer, war va zreid noaz
Da bardona da Geranna;
Em lec'h c'houi 'yel en eur gana :
Evit ho tigoll ho pezo.
Kement pezh dilhad a vezo,
War va c'horf paour pa dremenno;

(Outan e-unan.)

An Ankou ne zell ket ouz aour;
Krog eo en da zerch, Laouig paour!

(D'ar re a zo o selaou)

Ha pa 'z eo gwir e rankan mont
Gantan trumm da anzav va c'hont

Ho pezet holl ar vadelez
Pa vezin e bro an aelez,
Da lakat skriva war va bez
Ar veuleudi verr-man a-bez :

*Aman eo beziet Laou 'r Sec'hed
A varvas hep gellout tec'hel,
O veza ma n'oa ket a blas,
Dre aoun kentoc'h eget dre c'hlaz,
Ankounac'haet gantan, eun deiz,
Tenna e alan... tudou keiz,
Pedit ma c'hello kaout digor,
Er baradoz, a-drenv an nor.*

(D'ar spontailh.)

Breman va fec'hejou brasa
A rankan c'hoaz anzav ama.
Hervez ar c'henta gourc'hemenn,
Eun Doue zo, unan hepken;
Ha biskoaz n'her c'hredis ker mat,
Ha m'her gran, hizio, va den mat.

(Ar spontailh a hej gand an avel.)

N'it ket da denna, gant a reoc'h.
Va lezit da dremen e peoc'h.

(Outan e-unan)

En hanv Doue na doui ket
N'heller hen ober met ouz red,
Er pec'hed-man oun bet kouezet
Hep kaout anezan keuz ebet;
Fall am eus graet, hen anzav 'ran.
D'an trede gourc'hemenn ez an
A lavar d'eomp mirout ar zul
Hag eo labour an deiz-se nul;
Pa vez meneg da ehanan
N'eus den ebet par d'in aman.
Sed ar pevare gourc'hemenn:
Ouz tad ha mamm bezomp kempenn;
War heman n'oun ket bet re fall,
Ma 'm bije heuliet ar re all
Koulz hag hen e vije bet brao,
Met, siouaz, bresk oun bet atao!

(D'ar spontailh a wel oc'h heja gand an avel.)

En hanv Doue ho pet truez
Hag astennit d'in va buhez;
Taolit evez na deufe 'n tenn
Er maez, aotrou, d'am diskar krenn,
A-raok ma 'm bezo anzavet
An holl bec'hejou 'm eus kavet.

(*Outan e-unan.*)

Ar pempet gourc'hemenn a gouez
War ar re a laz, n'eo ket souez.
Al lazerez a zo eun dra
N'eo ket gouzanvet er bed-ma

(*D'ar spontailh*)

Aotrou soudard, al lezenn eo,
Hag, evelse, va lezit beo,
Evidon-me, ma 'm eus lazet
D'ar bed all n'em eus ket kaset
Nemed eur yar bennak ha c'hoaz
E krenen oc'h ober va laz.

(*Outan e-unan*)

Ar gourc'hemenn all, heb arvar,
Arabad laerez a lavar
Ha 'vidon-me ne laeris den
En aoun ha pa ne vefe ken
Da veza tapet war an taol
Ha kaset, war eün, da di Baol,
Da leski e tan an ifern,
El lec'h ma n'en do den sifern.

(*D'ar spontailh p'her gwel o koueza*)

Aotrou kaez, setu c'houi kouezet,
Ma n'ho peus ket bet droug ebet.
Eo eur brao d'in, rak, a hent all,
E c'hellfe c'hoaz an teodou fall
Mont têt en dro ha lavaret
Eo me am befe ho lazet
Evit ho laerez 'ta, m'oarvat,
Pa ne glasken nemet ho mad.
Astennit aman eun ezel
Ha m'ho sikouro da zavel;

N'am zamallit ket, gant a reoc'h,
den evel don ne gar ar peoc'h.

(*Pa wel eo eur spontailh eo a zo dirazan*)

Sell! heman n'eo ket eun den eo!
N'en deus na treid, na fri, na bleo,
Na kov, na kein, na divesker;
Rampok eo evel eur gweskler,
N'eus nemet kolo en e zae,
Ha kanab bet dindan ar vrac.
Eun taol eo a c'hoarier d'in,
Met tapout a rin ar paotr fin
En deus laket aman, dre fent,
Ar c'hoz spontailh-ma war va hent,
Ha ma kouez etre va meudou.
E vo gwasket e vorzedou.

(*D'ar spontailh*)

N'ouzon ket petra vir ouzin
D'az tevi evel eur skourr pin;
N'her grin ket c'hoaz, evelato;
War va skoaz, d'ar gêr, m'az kaso;
Gand ar zae a zo, war da gein,
Me 'n em wisko, ma n'eo ket brein,
Gant plouz da gov ha da zaou benn.
Vo tomm, d'am zreid, em boutou prenn.

(*D'an dud a zo o selaou*)

Ha breman a-raok ho kuitaat,
Bennoz Doue warnoc'h tud vat;
Ma c'houlenner ouzoc'h petra
E teu Laou 'l Lonker da veza,
Livirit eo seder ha brao
Hag e kar e vanne atao
Hag e veul ar re holl a c'hell
Chom heb eva... heb ober gwel.
An techou koz eo 'zo tenna
Pa vez c'hoant d'o diswrizienna,
Rak-se m'ema an tech ennoc'h
Hel lammit yaouank m'ho po peoc'h,
Aesoc'h eo d'eoc'h plega bleñchenn
Eget ne vo plega gwezenn.

(En eur vont kuit, gant ar spontailh, war e skoaz, e kano :)

Me gar va gwreg, koulskoude, daoust ma n'eo ket re [fin,

Daoust ma n'eo ket re fin,
Met eun tamm oun re droet,

dondeno,
Ouz ar chistr hag ar gwin,
dondo!

Y.-V. PERROT.



Yann paotr ar gêr

Yann, e-unan en ti, o ribotat. A-raok ma sav ar gouel, e klever ar vaz-ribot o vont en dro.

Yann o komz, en eur baouez da ribotat.

Evid ar beure, en eur vont alese, he deus laket ar vaz-ribot d'in em dourn : « Mat, emezi, pa ne fell ket d'it mont e kêr, gand an amann, e chomi da ober al labouriou wardro an ti; entent a res! » Hag abaoe emañ o skei 'barz ar banne laez pistoutou-man, ken am eus graet eur glogorenn, e gaol va biz bihan... ha c'houezi a ran ivez! Eun tamm diskuiz ne ray ket a zroug d'in, na ne ray (azeza a ra.)

Ha pa zonjan oun chomet da ober labour an ti !

Gwelout a raen e oa troet an dud da ober goap a-c'hanoun abalamour ma 'z aen da Wengamp, bep sadorn, gand ar viou hag an amann; ne gleven ken nemet : « Gogez ac'han, Yann ar baner alese! » N'em oa ket ken va hano da brena etre du-man ha Gwengamp : « Feiz! 'moun-me, red eo d'in dilezel ar viher-man! Janed, ma kar, a yel da werza he viou! »

Setu er beure-man, pa oamp o kas lein d'ar moc'h, — respet d'eoc'h, — ha me ha lavarout d'ezhi : « Ma keres ez i, e kêr, hizio, pa 'z eo brao an amzer. » — « Ya ! emezi, ha piou a ray wardro an ti? » — « Me!... »

N'ouzoun ket penaos e teuas ze ganen, met pa oa deuet e oa deuet; ne oan ket evid en em zislavarout.

Mantret oun, va zud keiz, pa zonjan pegen doun em eus bountet eno va biz em lagad! Ya! setu aze, ma vijen bet aet e kêr, e vijen bet breman oc'h eva eur chopinad, war va fasianted, e ti va c'homper Jobig ar Pinto, hag emañ aman o c'houezi a-uz d'eur banne laez ribot! C'houi lavar d'in : « E skeud-ze, da vihanan, ne vezo ket graet a c'hoap ac'hanout! » Petra livirit? Ar c'hontrol eo. Me wel Janed o vont e kêr; kenta hini eus he c'homerezed a en em gavo ganti, — hag ec'h en em gavo ouspenn teir dousenn etre Gwengamp hag aman, — e savo kaoz evel-hen : « Sell, Janed, te a zo deuet e kêr, hizio? Eun nevezenti eo da welout, plac'h kaez. Petra a zo en em gavet gant Yann? » — Ha Janed da respont evel just : « Yann

a oa skuiz oc'h ober ar vicher gogez hag a zo chomet er gêr, da ober labour an ti! » — Hag he c'homier kerkent: « Labour an ti? E feiz 'ta, neuze n'en deus ket chenchet kalz a vicher! » Hag o diou, raktal, da sklokal diwar va c'houst.

Souden, ec'h en em gavo eur gomer all hag e vezo graet ar memez kaoz; goude, eun drede, eur bedervet, eur bempet ha me oar... ba!... Abenn an noz e vezo aet ar brud dre bevar c'horn ar c'hanton, ha betek e Kerne hag e Leon, e oan me hizio oc'h ober paotr ar gêr, o skaota podou hag o ribotat laez. O! ar merc'hed! Ya! sonjit 'ta! A-raok, e veze graet goap ac'hanon, abalamour ma 'z aen e kêr ha bre'nan e vezo graet gwasoc'h c'hoaz, abalamour ma 'z oun chomet er gêr!...

Pe gousket e oan pe drelatet e oa va spered, unan a zaou, pa 'm eus lavaret e rajen labour an ti. Mont a ran e belbi; me a garfe e koucsfe ar gurun war an ti-man koulz ha war gement teod komer a zo etre Gwengamp hag aman!...


Ba! ne dalv ket d'in en em chaokat! Red mat eo reuzi: tremen hep takenn, kaout dismegans ha labourat gwasoc'h 'vid eur c'Fl!

Pa zonjan en holl draou am eus da ober e teuan da veza mezo ha dall!...

(Eur bugel bihan, en e gavell, en em lak da c'harmat.)

Ne welit ket aze! Dihunet eo al lapous all ivez.

(O vont betek ar 'havell, a-ziavaez, hag o luskellat.)



Hag e oan o lavarout? A! ya! nag a draou a zo da ober aze!... Heum!...

... Tenna plouz, lakaat al leue da zena, gouzelia dindan ar vioc'h, he c'has er maez, kignat patatez, bervi dour, ribotat laez, lakat laez da zevel, skaota podou, skuba an ti, sellet hag eman ar vi-gand ar yar velen, klask neiz ar yar vriz, poazat merenn, dibuna gloan, kere'hat dour, ober boued d'ar moc'oh, frota ar presou! Hag e kav d'ec'h e c'hellin padout?... Ha trouz, bre-

man zouden, ma ne vez ket graet an traou-ze holl: « Diwall, ervat, na vefe ket dibunet ar gloan-ze! Taol pled na vefe ket skubet an ti-man! Diwall na lezfes ar bugel-ze da ouela!... Ha bez sonj da gas ar vioc'h-se er maez!... Hag arabad ankounac'haat lakaat al laez-se da zevel!... Aiou! va fenn!...


Hag e keit-se, eman Janed, du-ze, gant he c'home-rezed, o lipat bannecou hag o tispenn va sae d'in: « Ba! amzer gaer hon eus; Yann a zo wardro ar gêr! »

Ha ma! eur banne am bezo ivez! Her gounit a-wale'h am eus graet!

(Dégas a ra eur werenn hag eur voutailh war an daol, met ar bugel a c'harm.)

Biskoaz kement all! Henez ne gousko ket 'ta!

(Luskellat a ra.)



Me, avat, am bezo eur banne a-raok!

(Mont a ra da ziskarga, en e werenn, pa glever trouz e-tal an nor. Lammat a ra da guzat boutailh, gwrenn ha ribot.)

Bet em eus bet eur gaouad aoun; me a gave d'in beza klevet unan bennak o klask dont en ti; ma vijen bet tapet gant va stal, sonjit 'ta pebez reoriad vez am hije bet! Ez an da zerra an nor. suroc'h eo!

(o tegas ar ribot.)

Skoomp c'hoaz 'barz heman! (Skei a ra eun taol bennak. O tizelei ar ribot.) Ar banne laez benniget-man ne deu ket a amann warnan.

Me ya d'hen stlepel e baraz ar moc'h!

(Kas a ra e ribot er maez.)

Red mat e vezo d'in mont buanoc'h gant va labouriou all kement all a draou a zo da ober aman.

Dibuna ar gloan a rankan breman. Aesoc'h e teuio an dra-ze ganen eged ar ribotadenn.

(Mont a ra da gerc'hat daou vloue gloan ha diou gudenn. Ar bugel a c'harm. En eur vont ha dont, Yann a gomz.)

Mab bras e dad eo, ya! ya!... Henez a zo paotr mat, ya! ya!

(Ar bugel a ouel bepred. Mont a ra Yann er maez.)
Graet e vezo dans a-bik d'ezan?

Dans a bik, dans a bik Hen nezeo mab e
da-dig hag en deiz hag en noz
Hen nezeo mab e dad-hoz

Alo! kouskomp breman!

(Dont a ra Yann war e giz. Ar bugel a ouel adarre.)

N'out ket evit stanka da c'henou, lampon fall! Prest em bije tra a-walc'h da ober o chom war da dro-te!

Asa penaos e rin-me da zibuna ar gloan-man? Daoust pere eo ar re zibunet, pe ar c'hudennou pe ar bloueuou? Me a gredfe a-walc'h em eus kudennou da ober gand ar bloueuou-man.

(Frezua a ra ar bloueuou, war eur gador.)

Asa! breman e rankan kaout eur banne, n'eus ket da lavarout nann!

(Diskarga a ra eur werennad, pa glev unnek eur o seni.)

Dek, unnek!... Unnek eur o seni ha va fatatez da gignat, va flouz da denna, va c'haol da zastum, va moc'h da verenna, va dour da vervi, va laez da zi-goavenni, va zi da skuba, ha... hag... hag a-benn eun hanter eur aman eman Janed war va choug!

Petra 'rin-me, vit mont buana? Lakat boued d'ar yer...

(Mont a ra er maez o c'hervel.)

Bouti! Bouti! Bouti!...

Breman ez an da gignat patatez. Ze ne harzo ket ouzin, Gwechall, er zervich, ne 'm oa ket va far da beñhat patatez.

(Tapout a ra patatez, en eur baner.)

Gwell eo d'in c'hoaz lakat dour war an tan!

(Degas a ra eur gaoter da greiz an ti)..

Ba! ba! ba! pelec'h eman va spered? Digoavenni laez eo tremen poent d'in ober!

(Tapout a ra eur bodez hag eur gloge pe eul loa; laez hag ez a en e gluch da c'houeza war ar c'hoavenn. Souden, o sevel, evel eun tenn.)

Asa 'velato ivez! ankounac'haet em eus sellout hag hen e oa ar vi gant ar yar velen ha klask neiz ar yar vriz!... Ha va fresou n'int ket frotet!...

(Bep komz ez a 'vit mont war eun tu bennak. O! chom a-zav.)

Sell! ha va flouz n'int ket tennet! Met, va c'haol a-zo ivez da gerc'hat! D'comp da gerc'hat kaol! D'comp da gerc'hat kaol!

(Ar bugel a c'harm).

Tu! tu! tu! tu! tu! tu! n'em eus ket amzer; n'em eus ket amzer da luskellat!...

Sell! va zi am eus lezet da skuba!

(Unnek eur hanter a zon.)

Unnek eur hanter! 'Benn...' benn... 'benn dek munut ema Janed war... war... war... war va choug!... Ma pozfen an orolaj, da vihanan?

(Tapout a ra neuze an torchouer da frot a pre-sou! Kerkent e krog er skubelenn da skuba met an traou holl a zo laket gantan a-dreuz e kreiz an ti. Teurel a ra e skubelenn hag e tastum a-vriad an traou en eun tu; an dour a skuilh; ar c'haol a gouez a-silabez gantan. Skuba a ra.)

Biken ne vezin prest e koulz!

(Ar bugel a c'harm)

Digor da c'houzoug 'ta!

(Klevout a ra trouz troid)

Arru eo! Breman 'vat eo mall d'in skara ac'han!
(P'eman o vont er maez, e sko e benn e Janed o
tont en ti gant he faner)

Hola! Hola! pelec'h ez es? Petra eo al laez a we-
lan aman 'barz ar varaz?... O den diboeil, kollet ez
peuz va ribotadenn!... Hag an traou holl a-dreuz e
kreiz an ti ha netra c'hraet ebet! Hag an evach war
an daol! A! lonker milliget!

(Stlepel a ra an evach gant penn-a-drenn Yann)

Pad ar beure e oas o karga da gof!!! Abalamour
da-ze e felle d'it chom er gêr!... Gortoz eun tamm!

Yann a fell de'zan komz, met Janed a red war
e lere'h gand ar skubelenn en eur youc'hal. Yann
a dec'h kuit hag ar gouel a gouez.

E. AR MOAL.



:- KENAVO! :-

Ar c'han kaer-man eo an hini a zo o kloza « *Eun
eured e Bro-Wened* » bet savet gant an Aotroneel Mare-
chal ha Dantec.

Ka-net hon eus a ga-lon vat en e-nor
 D'ar Vro, da zou e mall eo skoulma kent n'en gwi-
 -taat gand eur zo-nenn, hor c'harante.
 -te. Ke-na vo d'eo'h gwia bre to ned Bleu
 nia a ra al le venez e pep ha-lon oug
 ho kwe-let e-nor d'eo'h o'houi ha
 tri-ga-vez.

I

Kanet hon eus a galon vat,
En enor d'ar Vro, da Zoue,
Mall eo skoulma, kent 'n em guitaat,
Gand eur zonenn, hor c'harante.

Diskan

Kenavo d'eoc'h, gwir Vretoned,
Bleunia a ra ad levez,ez,
E pep kalon, ouz ho kwelet,
Enor d'eoc'h c'houi ha trugarez!

II

Sonet hon eus, breudeur karet,
'Vit hada joa, pellaat glac'har,
Ha deski d'an dason (1) laret
Ez eus Breiziz war an douar.

III

Ez eus, er bed-man, eur vro gaer,
Tud vat ha kalonek enni
Hag he deus taolet he splannder,
War hent an enor, hep fazi.



AR C'HANER

Doue ra viro Breiz, en he c'haer, da virviken!

AN DISKANERIEN

Ha ra viro Breiziz, war roudou o zadou, atao, atao!



(1) Dason pe hegleo a zo henvel; an eil ger, ma kaver gwelloc'h, a c'hell beza kemeret e lec'h egile.